

STORM

**AQUIS**  
**SUBMERSUS**

ROMANT

hervez ar germaneg :

Per DENEZ

AL LIAMM - TIR NA N-OG



AQUIS SUBMERSUS



T. S T O R M

**AQUIS**  
**SUBMERSUS**

hervez ar germaneg :

Per DENEZ

---

AL LIAMM - TIR NA N-OG

*Pep gwir miret strizh*

# Raklavar

*N'eo ket hep keuz e kasan ar skrid-mañ d'ar mouler rak, o tremen eus ar germaneg d'hor yezh-ni, en deus levr Storm kollet ul lodenn vat eus al liv krennamzerel a ra e hoalerezh. Ne oa ket tu, avat, d'ober a-hend-all : re zianav eo deomp-holl ar c'hrennvrezhoneg evit ma vefe bet klasket ennañ stummoù kevatal da re ur germaneg a chiz kozh. A-benn un ugent vloaz bennak, pa vezo bet roet da Vreizhiz, er cholajoù ha skolioù-meur, deskadurezh war o yezh, e vezo graet, sur-mat, al labour a-nevez, ha kalz gwelloc'h. En gortoz, e kredan kinnig an danevell-mañ d'ar vrezhonegerien gant ar pep priziusañ eus he chened vresk hag eus he from soutil.*

**P. D.,  
Kemper, miz C'hwevrer 1950.**





## Aquis Submersus

Abaoc pell, pell amzer moarvat e oa bet lezet digempenn liorz h hor c'hastell kozh, rak en amzer va yaouankiz dija e oa kresket kement he bodoù faou-put ma ne chome etrezo nemet gwenodennoù strizh ha tasmantel. Glas-skedus 'oant, avat, ha ken dibaot eo ar gwez en hor bro ma plijent deomp kenañ ha ma karemp kalz mont en o skeud da bourmen ha da rambreal. Peurliesañ e kasemp hor c'hammedoù etrezek ar Menez, e-giz ma veze graet eus an dorgennig en tu all d'ar poull-dour, rak diwar he lein e veze gwelet ar vro en he fezh. War-du ar c'hornog e plije neuze d'an holl treiñ o selloù, war-du ar Marschen glas-sklaer hag an tonnoù gwenn-arc'hant, war neuñv enno tres hir un enezenn ; me, avat, a glaske atav va daoulagad, diouzh tu an hanternoz, tour louet an iliz kozh a save, ul lev ac'han, dreist an havregi hag ar breinaregi : rak eno am boa anavezet gwellañ eurvezhioù va yaouankiz.

Mab ar pastor a zeue d'ar skol e kêr ha n'ouzon pet gwech eo c'hoarvezet deomp kemer a-gevret, ar sadorn d'abardaez, hent ar frankiz, evit distreiñ a-gevret ivez, ar sul da noz pe al lun da vintin, da gaout levrioù ha kaieroù. En amzer-se e chome c'hoazh, hanter-hent, un darnig eus al lanneg vras en em astenne gwechall tre betek kêr. Eno e safrone, e-touez

bleuñv frondus ar brug, ar gwenan gwenn-louet, ha dindan ar gwrizioù sec'h e rede primik c'hwiled glas hag alaouret ; eno, en aer karget gant c'hwhez al lann hag ar pin-gouez, e tarnije balafenned seurt na oa da vezañ gwelet e nep lec'h all. Ha va mignon, mall gantañ en em gavout er gêr, en deveze alies bec'h bras ouzh va sachañ d'e heul a-dreuz traoù ken burzhudus. Kerkent ! a tizhet ganeomp ar parkeier, avat, e valeomp kalz mibinoc'h, rak er pellder, dreist da c'hlasvez teñval al lireu, e save talbenn ar pastordi, laouen e brenester munut evel ur gouviadenn.

Gant an daou bried mat, n'o doa da vugel nemet va mignon, e veze roet deomp atav, e-giz ma vez lavaret du-mañ, kement tra hor boa c'hoant hag al loar war ar marc'had. An eflenn vras hepken – ne oa er gêriadenn gwezenn ebet ken uhel all hag a-se ken dedennus all – an eflenn vras a sarac'he he delioù arc'hant dreist an doenn soul kinviet, a oa berzet ouzhimp e-giz avalenn ar baradoz ouzh hon tad kentañ, ha ne bignemp ganti nemet dre laer. Ne oa, m'am eus soñj mat, difenn all ebet, hag eürus e oar ar vugale bevañ hep difennoù.

Pennañ tachenn hon taolioù-kaer a oa ur prad ec'hon, sko ouzh hol liorz, hag a veze graet anezhañ Park ar C'hloareg. Eno e ouiemp kavout, gant ijin-natur ar gañfarded, neizhioù alc'houedered pe meleneged hag a veze graet dezho, da c'houde, nouspet gweladenn e-sell evezhiañ pegen buan e kreske al labousedigoù. Eno, en ul lenn don gronnet gant haleg-mors ha, war a gredan hiziv, kalz dañjerusoc'h eget an eflenn, e ouiemp tapout c'hwiled du souezhus lesanvet ganeomp Gallaoued-dour ; pe c'hoazh e kasemp d'an emgann ar bagoù brezel fardet ganeomp diwar dammoù boestoù kozh. En diskar-amzer ez aemp, gwech ar mare, da lakaat an arigrap, e berjez ar sakrist, war hol lodennig avaloù trenk, daoust da c'hourdrouzoù hegarat an den kozh madezhus. Sed ar plijadurioù a vleunie e Park ar C'hloareg, re baour e zouar evit kement boket all. Ar waz, hepken, a c'helle kreskiñ eno ivez,

ha frond put he gwiskadoù alaouret a glevan c'hoazh pa droan da soñjal en amzer va yaouankiz.

Bresk ha dibad ar seurt levenezioù, koulskoude. Kalz donoc'h ha padusoc'h e oa an estlamm dihunet ennon gant un dra all na oa, e kêr zoken, netra par dezhañ. N'eo ket gant ar gwesped emañ – daoust ma oa plijus-bras, e tommder ar c'hreisteiz, chom da sellout ouzh an amprevaned askellet-souezhus a loje e moger frailhet ar staol – met gant an iliz bras meurdezus. Greunvaen 'oa holl, eus an traoñ d'al laez, ha pa oa bet savet war un uhelenn, e c'helled gwelout, a-zirak enni, ar brugegi flamm, ar Marschen ha, pell-pell, ar mor. En diabarzh avat e oa ar pep bravañ evidon. Ar mell pikol alc'houez e-un, ken kozh a vije bet lavaret ha Per an Abostol, a vroude eston va faltazi ; hag, e gwir, e tigare deomp, pa c'hellemp kaout anezhañ digant ar sakrist, an nor d'ur bed marzhus, tremenet a bell 'oa, hag a selle ouzhomp-ni tud vev gant daoulagad teñval a-wechoù, madelezhus a-wechoù-all, met atav leun a gevrin. E-kreiz an iliz e oa ur Jezuz ouzh ar groaz. treut-spontus e izili hag e zremm disneuziet gant ar gwad o tiruilhal ; pelloc'hik e klude ur gador-brezeg rikamanet war ul luziaj loened divalav ha diaouled orbidus. Met gant ar stern-aoter bras, kizellet warnañ pasion ar C'hrist, e vezen dedennet dreist-holl : fasoù gouez ha vil evel re ar soudarded o harnezioù alaouret a c'hoarie an diñsoù evit mantell an Aotrou na oa ket tu da welout er vuhezig pemdeziek ; loavus-dreist e oa, en enep, dremm gaer Mari stouet e-tal ar groaz ha leuniet he defe va c'halon gant ur garantez vugelel ma ne vije ket bet gounezet gant un dra hoalusoc'h.

Bez' e oa en nevez, iskisoc'h c'hoazh eget kemend-all a draoù iskis, skeudenn fromus ur bugel marv. Ur paotrig koant, pemp bloaz dezhañ pe war-dro, en e astenn war ul lenn dantelezh, gantañ en e zornig disliv ul lugustrenn wenn. War e zremm dener e oa skrij ar marv, hag ivez ur skleurig dister a vuhez, evel pa vije bet an hini bihan kaezh o c'houlenn skoazell.

Bewech m'en em gaven dirak ar poltred e kinnige va c'halon tarzhañ gant an druez.

Hogen ne oa ket ar bugel e-unan-penn. En e gichen, en ur framm koad teñval, e oa skeudenn un den melkonius, dezhañ ur barv du ouzh e chink ha dilhad pastor a c'hiz kozh war e gein. Tad ar paotrig koant an hini 'oa, a lavare va c'heneil : hervez ar vrud e oa bet beuzet ar bugel e lenn Park ar C'hloareg, pell amzer a oa avat, peogwir e oa skrivet 1666 e korn an daolenn. Ur souezh pegen dedennet e vezen gant ar paotrig paour : karet am bije gouzout traoù diwar e benn ha diskleriadurioù a glasken, zoken, war fas teñval e dad, hag a zegase da goun din, daoust d'e zilhad beleg, soudarded spontus an aoter.

Goude seurt prederioù e damskeud an iliz kozh, e oa plijusoc'h c'hoazh ti ar pastor mat. Kozh-kozh e oa ivez, an ti karet, ha soñj am eus e spie tad va c'heneil e vije savet unan nevez dezhañ : hogen pa oa lojeiz ar sakrist ken dirapar all, e chomjont o-daou evel ma oant. Ha, koulskoude, na pegen hegarat e vezent, pennoù an ti kozh : er goañv ar salig en tu kleiz d'an trepas, en hañv ar gambr en tu dehou, a oa kinklet he mogerioù gwenn gant skeudennoù diwar an almanak, hag a veze gwelet, dre he frenestr, ur veilh avel hec'h-unanig war skramm ledan un oabl rozlivet pep enderv gant an heol o vont da guzh. An tad hag ar vamm, Doue d'o fardono, ar c'hadorioù-brec'h o mezer ruz, ar gourvezvank bras ha, war an daol da serr-noz, ar pod-te a gane ken laouen – kement-se a oa an amzer-vremañ, un amzer-vremañ sklaer ha karadek. Hag en amzer gozh, koulskoude, e trois da soñjal un abardaez (en eil klas e oamp neuze) : rak daoust ha n'en doa ket, eñ ivez, fringet dre ar pennoù-mañ, drant e Jagad ha livrin e zivjod, ar paotrig a oa hremañ e skeudenn o leuniañ an iliz gant tristidigezh ur vojenn velkonius ?

Lakaet e oa bet seurt menozioù em penn, sur a-walc'h, gant ar weladenn hor boa graet d'an iliz goude pred. Aet e oamp, war va fedenn, da sellout ur wech muioc'h ouzh skeudenn

ar paotrig hag en ur c'horn anezhi am boa dizoloet peder lizherenn treset gant liv ruz.

« C. P. A. S. a zo skrivet amañ, » emeve da dad va mignon. « Peseurt talvoudegezh a zo gant al lizherennoù-mañ, avat, sed n'on ket evit lavarout. »

« O anavezout a ran a bell 'zo, ho lizherennoù, » eme ar pastor. « Pa ouzer istor ar bugel n'eo ket diaes treiñ an div ziwezhañ gant **Aquis Submersus**, da lavarout eo **beuzet**, ger evit ger **beuzet en dour**. An div gentañ avat n'eus bet kavet dezho ster diarvar ebet betek-hen. Ar sakrist yaouank, hag a zo bet gwechall war e dammig studi er c'holaj, a lavar e talvezont kement ha **Casu Periculoso, dre un degouezh argollus**. Poellekoc'h eget hor sakrist e oa paotred an amzer gozh avat, ha peogwir eo bet beuzet ar bugel e oa ouzhpenn argollus an degouezh. »

Digor-bras va divskouarn am boa selaouet. « **Casu, casu,** » emeve. « Ha perak ne vefe ket **Culpa** ? »

« **Culpa,** » eme ar pastor war va lerc'h. « **Dre fazi...** Hogen dre fazi piv ? »

Ha me, soñj o tont din eus doare kriz an den war ar skeudenn, da c'harmiñ : « **Culpa Patris** eo moarvat ».

Spouronet e voe ar pastor mat. « **Culpa Patris ! Dre fazi e dad !** Oc'hu, va mignon yaouank, arabat koulskoude lakaat un torfed e gwall va c'henvreur aet da anaon, daoust pegen teñval eo e fas. Hag ouzhpenn-se, diaes eo krediñ en dije lezet skrivañ ar seurt tra diwar e benn. »

Anat e voe din furnez an evezhiadenn, Ken e chomas evidon ster an enskrivadur kevrin an tremened.

A-hend-all am boa merzet diouzhtu e oa an div skeudenn-mañ kalz gwelloc'h eget ar re all en iliz ha digant tad va mignon e klevis e oant anavezet evel oberoù un diskibl d'ar vistri hollandat. Penaos, avat, e oa deut ar seurt livour d'en em goll e ken dister ur gêriadenn, ha piv e oa. sed n'hellas ket ar pastor lavarout din. Ha ne oa tamm anv e traoñ an taolennoù.

Tremen a reas an amzer. P'edon war va studi er Skol-Veur e varvas tad va c'heneil ha diwezhatoc'hik ez eas ar vamm da chom en ur gêriadenn all, lec'h ma oa bet anvet he mab da bastor : ha diwar neuze n'em boe mui tro da welout ken an iliz kozh.

Un deiz – abaoe ur pennad mat e oan deut en-dro da vevañ e ti va zud – e rankis mont da glask lojeiz evit ur c'hendervig deomp hag a oa kaset d'ar skol e kêr. Brav e oa an amzer, ken brav hag an eñvorennoù yaouankiz a leunie va fenn ; ha dudi leizh va c'halon e tiskennen dre ar straedoù heoliet-puilh pa voe sachet trumm va evezh, e korn ar marc'hallac'h, gant div werzenn **plattdeutsch** kizellet e talbenn an ti uhel a zo eno :

### **Kerkoulz ha poultr pe vogedenn**

#### **Sed penaos e tremen mab-den.**

Moarvat ne oa ket daoulagad ur c'hrennard evit gwelout ar seurt gwerzennoù, rak gwech ebet n'am boa o lennet pa zeuen, paotrig yaouank ac'hanon, da brenañ ur varaenn domm gant ar pober a oa eno o chom. Didermal ez is en ti ha dres e oa ennañ lojeiz vak. Kambr ar voereb kozh – a lavaras din ar perc'henn hegarat-bras – a oa bet goullo pell a-walc'h evel-se : gant plijadur e kemerfent ur skoliadig da lojañ. Ha diouzhtu e voen kaset da welout ur penn izel, ennañ arrebeuri giz kozh ha dezhañ daou brenestr bihan a zigore dres war al leurenn. Gwechall, a gontas ar mestr, e oa div wezenn-dilh vras dirak an ti, hogen lakaet e oa bet diskar anezho dre ma taolent re a skeud ha dre ma kuzhent ar gwel.

Ne voemp ket pell oc'h ober emglev. Da flapat un tammig e oan chomet pa gouezhas va selloù war ul livadur-eoul ispillhet ouzh tal un armel : miret-mat e oa ar skeudenn, ha diskouez a rae un den kozh, parfet e zremm ha kuñv e zaoulagad, gantañ war e gein dilhad liv teñval seurt a veze douget er seitekvet kantved gant an noblañsoù a studie muioc'h ar politikerezh, pe ar skiantoù, eget micher an armoù. N'eo ket an den kozh avat en doa va strafuilhet, met ar paotrig a oa gantañ etre e zivrec'h : ar paotrig-se, ul lugustrenn wenn en e zornig disliv, a

anavezen abaoe pell, hag amañ c'hoazh e oa bet klozet dezhañ e zaoulagad gant an Ankou.

« A belec'h eo deut deoc'h an daolenn ? » a c'houlennis, merzet ganin e oa tavet mestr an ti.

Ur sellad souezhet a reas ouzhin.

« An daolenn gozh ? O deut eo deomp a-berzh hor moereb : graet eo bet gant un eontr kozh dezhi, a zo bet livour diouzh e vicher hag en deus bevet amañ ouzhpenn kant vloaz a zo. Un nebeut kozh-kailhoù all a zo chomet c'hoazh war e lerc'h. »

Hag eñ diskouez din, war korn an armel, ur c'houfrig prenn-derv kizellet-kaer. Kozh e oa ivez : p'hen diskennis e kouezhas ar c'holoenn diwarnañ hag e-barzh e welis ur bern paperennoù aet melen gant an amzer.

« Gallout a ran lenn anezho ? » a c'houlennis.

« Ma plij deoc'h. Ha ma plij deoc'h ivez e c'hellit o c'has ganeoc'h d'ar gêr. Paperachoù kozh n'int ken. Ne dalvont mann. »

War va goulenn em boe aotre da azezañ er pikol kador-vrec'h dirak ar skeudenn gozh ha da chom eno da lenn ar paperioù didalvez. Va lezel a reas mestr an ti. sebezet-naet an tamm anezhañ, goude prometiñ hegarat e teufe hepdale e wreg da zegas din un tasad kafe mat. Kent pell avat e oa bet disoñjet ganin pep tra war va zro.

\*

\* \*

Er sulvezh-mañ **Cantate, anno 1661**, en em gaven adarre en Holsten, va bro garet ! – Lezet em boa e kêr pakadoù ha traoù-livañ ha sart ez aen bremañ a-dreuz ar faoueg he glasvez mae gant an hent a gas eus an aod d'an argoad. Nij-dinij dirazon e lamme koubladoù laboused a-hed ar sodelloù leun a zour-chag : rak ur glavig a oa bet e-pad an noz ha savet ne oa ket c'hoazh an heol da sunañ ar glebor.

Galv sklintin an driski er frankizenn a zassone en ur galon ken drant-all. Labour am boa bet e-leizh en Amsterdam. dre vrud va mestr ker Van Der Helst, hag en dienez ne oan kouezhet biskoazh : en enep, ur yalc'hig kaer a zegasen endro ganin ha zoken ul lizher-arc'hant da vezañ paeet din diwezhatoc'h en Hambourg. Ha cheuc'h-tre e oan fichet war ar marc'had : war ur vantellig feur louet e kouezhe va blev hir hag ur c'hleze. evel ma oa dleet, a oa ganin ouzh va c'hostez.

Va soñjoù. avat, a yae buanoc'h egedon : ha krediñ a raen zoken klevout an Aotrou Gerhardus o c'harmañ kalonek diwar treuzoù an nor en ur astenn e zivrec'h davedon : « Bennozh Doue warnout, va Johannes ! » E-ser va zad, Doue d'e bardono, e oa bet an Aotrou Gerhardus e Iena war studi al lezenn : un den gouiziek, ma oa unan, ken e oa deut hon dug Friedrich da c'houlenn e skoazell p'en doa bet c'hoant sevel ur Skol-Veur en hor bro ; hag un den madezhus ivez, peogwir e oa chomet atav, hag eñ nobl, keneil feal d'am zad karet, ha peogwir en doa kemeret preder muioc'h eget na oa da c'hortoz gant an emzivadig paour a oa ac'hanon : arc'hant en deveze roet din bewech m'am beveze bet ezhomm ha tizhet en doa, dre berzh Hollandiz uhel mignoned dezhañ, lakaat degemer ac'hanon da ziskibl gant al livour brudet Van Der Helst. Ha neuze, re daer e vije savet va fedenn war-zu Doue, pa ouien e oa an den kozh karet sioul ha yalc'h en e vaner ? Rak brezel a oa bet er vro e-keit ha m'edon-me o labourat en Holland ha ker gwazh ha ker gwazh o doa en em ziskouezet an enebourien ha soudarded ar roue : divezh e oa bet lazhet ganto tud-a-iliz ha merc'hed zoken. Da heul marv Carolus a Sveden e oa deut ar peoc'h, met nag a rivin e pep lec'h : tiez bihan, mereurioù koant, lec'h m'am boa bet nouspet banne laezh livrizh da evañ, ne chome ken diouto nemet dismantrou mopedet war ribl an hent hag ar parkeier a ziwane enno, gwechall, d'ar mare-mañ bloaz, ar segal glas-lufus, a oa gounezet-holl gant ar strouezh hag al linad.



Kement-se, avat, ne boueze ket re war va c'halon. Ur soñj n'am boa ken : diskouez d'an aotrou mat, dre va ampartiz, na oa ket bet kollet e brofoù na foranet e arc'hant. Ne oan ket chalet kalz kennebeut gant an hailhoned hag al lamponed, tec'het diouzh an armeoù, a oa manet da gantreal dre ar vro : ar Junker Wulf hepken a lakae diaes va spered. Hemañ n'en doa karet ac'hanon morse ; graet en doa din kompren e selle ouzhin evel ul laer en e geñver dre ma tegemerenn moneiz digant e dad, ha meur a wech pa zeuen da dremen ar vakañsoù er c'hastell en doa karget a c'hwervoni va devezhioù bravañ. Daoust hag-eñ e oa c'hoazh e maner e dud, sed na ouien ket ; gouzout a ouien hepken e oa bet gwelet alies o c'hoari hag o kas anezhi gant an ofiserien svedat, zoken a-raok me ve bet sinet ar peoc'h, pezh na oa ket brav d'ur paotr-Holsten ober.

O treiñ ar seurt soñjoù em spered e oan deut er-maez eus ar faoueg ha bremañ ez aen gant ar wenodenn a gas d'ar vereuri dre greiz ar goadeg pin. C'hwez ar rousin a zegase din eñvoriou kaer ha laouen e vijen chomet eno da rambreal. Prestik avat en em gaven e lagad an heol, a bep tu din pradeier druz o c'hleuziadoù kelvez, hag e saven gant bali vras ar maner.

N'oufen lavarout pegen ankenius un trivliad a bakas va c'halon neuze. Koulskoude, a lavariz ouzhin va-unan, ne oa abeg ebet d'ar seurt strafuilh : seder e skuilhe an heol e vennozh war bep tra hag eus an oabl e tiskenne sklinton kanig drant an alc'houeder ; pelloc'h zoken, e-tal ar wenaneg e vouskomze sart en avel ar wezenn gozh kalper : « Doue d'az pennigo ! » emeve a vouezh izel. N'eo ket er wezenn gozh lirzhin e soñjen avat, met er plac'hig koant a oa da vezañ levez ha tristedigezh va buhez, evit bremañ ha da viken : merc'h an Aotrou Gerhardus, c'hoar nemeti ar Junker Wulf.

Ne oa ket pell e oa marv va zad karet pa 'z is evit ar wech kentañ da dremen va ehan-skol er maner. Neuze e oa hi ur plac'hig nav bloaz, a nije dreo he flañsonoù gell war he divskoaz, ha daou vloaz koshoc'h e oan-me. Ur beure

'ta, p'edon o vont, balc'h an tamm ac'hanon gant ar wareg onn hag ar saezhioù beget-plomm a oa bet fardet din gant Dietrich kozh, ar merour a lojen en e gichen a-us d'an nordal – p'edon o vont da chaseal an evned-preizh a ragache hed an devezh en-dro d'an ti, setu ma tilammas-hi war-du ennon. « Gouzout a rez, Johannes ? » emezi. « Un neizh a anavezan ha dit-te he diskouezin. Du-hont, e toull ar wezenn ber. Eostiged-bailh ez int. Arabat dit o lazhañ 'vat ! » Ha hi kuit ken prim all, o lammat hag o fringal. Ne oa ket erru ugent kammed diouzh ar wezenn gozh, avat, ma chomas trumm a-sav : « Ar barged ! Ar barged ! » a c'harmas, juntet he daouarnigoù gant ar spont. Hag e gwir e oa ur mell kaouenn vras war hec'h api er skourroù, o c'hortoz pakañ ul labousig. « Ar barged ! Ar barged ! » a c'harmas an hini vihan adarre. « Tenn buan, Johannes, tenn buan ! » Evel bouzar e oa aet ar gaouenn gant ar c'hoant-debriñ ha difiñv-kaer e chome, paret he selloù war an toull e kef ar wezenn. Stegnañ a ris va gwareg ha kerkent e kouezhe an evn-preizh d'an douar, tra ma kemere ul labousig e nij en ur c'heizañ.

Adalek neuze e voen keneil bras da Gatharina, ha ganti e vezen atav o c'hoari er c'hoad pe el liorz. En abeg da se e kavis un enebour : Kurt Von Der Risch, mab un aotrou pinvidik a oa o chom en ur c'hastell tost e-kichen. Alies e teue henezh d'hor gwelout da heul e gelenner, un den gouiziek a veze ur blijadur d'an Aotrou Gerhardus komz gantañ, ha peogwir e oa kalz yaouankoc'h eget ar Junker Wulf, e veze ret-mat d'ar Von Der Risch dont da c'hoari gant Katharina ha ganin-me : hag ar verc'hig he blev gell a seblante plijout dezhañ kalz. Koll e amzer ne rae ken ganti avat. Rak hi a c'hoarzhe goap warnañ dibaouez, war e fri erer hag e zaoulagad polos. Kerkent ha ma wele anezhañ o tont, e c'harme gant he mouezhig sklintin : « Johannes, ar barged ! Ar barged ! » hag e redemp evel daou foll da guzhat a-dreñv al laboù pe er c'hoad en tu all da voger vras al liorz. Ret eo anzav e veze sach-blev pa dizhe ar Von

Der Risch hon tapout ; kounnarus e oa. avat, muioc'h eget nerzhed, ha peurliesañ e chome an tu kreñv ganin.

Ar wech diwezhañ ma oan aet d'ar maner, un nebeut sizhunioù kent loc'hañ kuit d'an estrenvro, e oa deut Katharina da blac'h yaouank : paket he doa he blev gell en ur roued liv an aour hag en he daoulagad e lufre, bep ar mare, ur skleurig birvidik en dije war-bouez nebeut troc'het ouzhin va anal. Ouzhpenn-se e oa bet lakaet warni da evezhierez un dimezell gozh, izil ha blinik, a rae an holl « tintin Ursul » outi ; dalbec'h e veze tintin Ursul, gant he brochennoù hag he stamm, war-lerc'h ar verc'hig ha morse ne zistroe he selloù diwarni.

Un endervezh a viz Here, p'edon o pourmen ganto o-div e skeud garzh al liorz, setu ma weljomp o tont war-du ennomp ur mell pezh hir a baotr, gwisket tre **à la mode**<sup>1</sup> gant ur chupenn ler dantelezhed hag un tog pluennet-brav : va enebour kozh an hini 'oa, na petra 'ta, ar Junker Kurt Von Der Risch. Anat e voe din diouzhtu e pade d'ober al lez d'e amezegez koant hag e seblante an dra plijout kenañ da dintin Ursul : un « Aotrou Baron » a zeue ganti fraez ha sklaer bewech ma tigare he genou da gomz ha diouzhtu goude ur c'hoarzhig hegasus a gave-hi **obligeant**<sup>2</sup> meurbet. Me, en enep, pa c'hoarveze din rannañ ur ger a veze graet ouzhin « eñ » pe « Johannes » sec'h ha kras, ar pezh a rae d'ar Junker treiñ e zaoulagad polos etrezek ennon ha sellout ouzhin evel pa vijen bet ur c'hrouadur en e gichen, ha me un hanter dreuz-penn warnañ ! Un taol-lagad a ris war-du Katharina : ne rae van ebet ouzhin ; dereat e valee e-kichen ar Junker, o tivizout gantañ seven-meurbet ; war he muzelloù, avat, e pare gwech an amzer ur mousc'hoarzhig goapaus a rae din soñjal ennon va-unan : « Az pezh fiziañs, Johannes. Ne vo ket atav an tu gounid gant mab an denjentil ». Feuket an tamm ac'hanon avat, e chomis en a-dreñv. Aet e oant o-zri

1 galleg : diouzh ar c'hiz.

2 galleg : seven.

e-barzh an ti ha du va fenn e vanen dirak bleuñvegi an Aotrou Gerhardus oc'h ijinañ penaos e c'hellfen kemer va c'hrog war ar Von Der Risch pa zilmmas-hi trumm em c'hichen : stouññ a reas da guñtuilh ur vleunienn ha hiboudiñ em skouarn : « Gouzout a rez, Johannes : ar barged a zo heñvel ouzh un erer yaouank ; tintin Ursul he deus lavaret ! » Ha hi kuit. ken prim ha ma oa deut. Digounnaret e oan bet en un taol : petra verne din bremañ ar Von Der Risch hag e ardoù ? Drant ha sklinton e tregernas va c'hoarzh en deiz sklaer alaouret rak digant ar cheorenn am boa bet ur sellad a oa aet e flamm betek don va c'halon.

Dambrest goude ez is da welout an Aotrou Gerhardus en e gambr, hag adarre e tiskouezas din war ar gartenn dre be hent ez afen da Amsterdam, e roas din lizheroù evit e geneiled du-hont, hag e tivizas ganin madelezhus-bras, evel ur c'heneil feal ma oa bet atav d'am zad karet, Doue d'e bardono. Rak an noz-se end-eeun e ranken mont e kêr da gaout ar bourc'hiz a gasfe ac'hanon en e garr betek Hambourg.

Da ziskar an devezh e kimiadis. E sal an traoñ e oa Katharina, kaer-fromus he gouzoug gwenn stouet war he broderezh. Ne oa ket hec'h-unan-penn siwazh : tintin Ursul en he c'hichen a lenne a vouezh uhel ul levr istorioù gallek. Sevel he fri a reas an dimezell gozh pa zeuis tre : « Arsa 'ta, Johannes, dont a rez da lavarout kenavo ? Gallout a rez ober diouzhtu da stouadenn dirak an dimezell ». Aet e oa Katharina en he sav. Hogen dres pa astenne din he daouarn, setu ma tegouezhas an daou Junker, Wulf ha Kurt, trouz ha cholori ganto. Ken ne c'hellas lavarout tra nemet : « Kenavo, Johannes ». Hag ez is kuit.

E toull an nor e kavis Dietrich kozh, a roas din va sac'h ha va bazh, ha goude stardañ dorn ar merour mat e tiskennis war-du gwenodenn ar goadeg. Diegi am boa o pellaat, avat, evel pa n'em befe ket lavaret kenavo evit mat, ha meur a wech e chomis a-sav da deurel ur sellad en a-dreñv. Ret din diskleriañ ivez na oan ket aet dre an hentig-treuz, hogen dre ar vali vras,

hag a zo kalz hiroc'h Merzet ganin a-greiz-holl e ranken hastañ 'fo m'am boa c'hoant bezañ e kêr a-raok serr-noz, e hiboudis : « Kenavo, Katharina, kenavo ! » Ha mibin ez is war-raok.

El lec'h ma kej an hent gant ar wenodenn. Avat, – trefus e teuas va c'halon gant al levenez – setu na tifoupas-hi, e-giz un heiez. a-zindan ar saprenned : redek a rae, ruz-ruz he divjod, ha ken taer e lammas dreist ar wazhig ma strinkas he rodelladoù gell kaer diouzh o roued alaouret ; hag evel-se. fuilhet he blev, e kouezhas etre va divrec'h. Bec'h warni o tennañ hec'h anal, e selle ouzhin gant daoulagad skedus. « En em laerezh... en em laerezh am eus graet ! » Ne oa ket evit komz. Lakaat a reas ur pakadig em dorn : « Dal, sed evidout, Johannes ». Trumm, avat, e teuas teñval he dremm gaer : c'hoant he doe lavarout un dra bennak c'hoazh hogen ne c'hellas ket ; dont a reas an dour en he daoulagad. Glac'haret e stouas he fennig ha lammat kuit a-dre va divrec'h. He brozh a welis o steuziañ e teñvalder ar c'hoad ; trouz ar skourroù a glevis ur pennadig en diabell ; ha neuze edon va-unan-penn. Ker sioul e oa pep tra ma c'hellen klevout an deil o kouezhañ. Digeriñ a ris ar pakadig : e-barzh e oa ur pezh aour, deut dezhi digant he faeron ha bet diskouezet din meur a wech, ha war-c'horre e oa skrivet : « Evit na vefes morse en dienez ». Neuze e savis va divrec'h : « Kenavo, Katharina, kenavo, kenavo ! » a c'harmis ouzhpenn kant gwech... Noz e oa pa erruis e kêr.

Pemp bloaz a oa tremenet abaoe... petra oa deut Katharina da vezañ ?

Erru e oan e-tal an nor-vras ha didermal ez aen er porzh ken fresk e skeud an div wezenn-dilh pa zilammas warnon ur c'houblad pezhioù melloù chas ferv, a ziskrogne o dent hir evel p'o dije karet va lonkañ. Morse c'hoazh n'am boa bet seurt degemer, ha diaes-bras en em gaven pa glevis ur vouezh raoulet anavezet-mat o c'harmiñ : « Deut amañ, Tartar, Turk, ha grit peoc'h ! » Ha diouzhtu goude, evit va brasañ plijadur, e teue Dietrich kozh d'am chaout.

Anat e voe din, ouzh e welout, e oan bet pell en estrenvro ; rak ar paotr karet a oa bremañ gwenn-erc'h e vlev, ha trist-meurbet e zaoulagad gwechall ken laouen. « Aotrou Johannes ! » emezañ ken, oc'h astenn e zaouarn davedon.

« Penaos 'mañ ar bed, Dietrich ? » a lavarís... « Abaoe pe da vare avat ez eus ganeoc'h chas ken terv, a lamm war an dud evel pa vefent bleizi ? »

« Gant ar Junker Wulf eo deut ar re-mañ, » a respontas.

« Er gêr 'mañ ar Junker neuze ? »

Ober ya gant e benn a reas an den kozh.

« Moarvat ez eus ezhomm bremañ kaout chas da ziwall an tiez, » emeve, « kemend-all a livastred a zo chomet er vro da heul ar brezel. »

« Siwazh, aotrou Johannes. » Ha difiñv e chome an den kozh dirazon evel p'en dije karet mirout ouzhin a vont pelloc'h er porzh. « E poent fall e tegouezhit. »

« Gwir eo, » emeve. « Bleizi a zo bremañ er mereurioù e-lec'h ma veve eürus ar gouerien gwechall. Hogen mestr ar c'hastell a ouezo reiñ skoazell d'ar re baour. »

« Siwazh, » a respontas Dietrich kozh, o stankañ an hent ouzhin atav, « re ziwezhat eo deut ho lizher eus Hambourg : n'eo ket bet lennet gant an aotrou Gerhardus. »

« Penaos, Dietrich ? » a c'harmis. « Penaos ? »

« Ya, aotrou Johannes, echu eo an amzer vrav. Marv eo ar mestr karet. Du-hont er chapel emañ e gorf, gouleier a bep tu dezhañ. Ha kalz traoù a zo bet kemmet dija abaoe... Hogen un den paour ne don ken. Ha fur eo din tevel. »

C'hoant am boe goulenn : « Ha Katharina, pelec'h emañ ? » Met ne gredis ket. Gouzout a ouien hepken e tleen mont da welout an aotrou Gerhardus e chapel ar re varv. « Digor eo ar chapel ? » emeve, hep re soñjal. Peditñ a ris neuze ar merour kozh da dapout ar chas ha glac'haret e treuzis ar porzh na save nep trouz ennañ nemet kanig ur rouzegan e lein ur wezenn-dilh.

Kornzigor e oa dor ar chapelig ha mantret-holl ez is da zaoulinañ e-tal an arched a welen ennañ damguzhet e plegoù ar boulouz ruz. dremm skornet an den kozh karet. Krog e oan da lavarout ur bedenn virvidik pa savas, en tu all d'ar varskaoñ, ur fas disliv ha spontet-mik. Ne badas ket pell ar spouron er selloù gell, avat, ha taer e teuas ar c'harmadenn : « Johannes ! Deut oc'h 'ta, Johannes ! » Met diouzhtu goude e oa trist ar vouezh adarre : « Siwazh, re ziwezhat oc'h deut ! Re ziwezhat ! » Ha dreist an arched e pakis an daouarn astennet. Katharina an hini oa, ken kenedek ma santis va gwad o virviñ. dirak ar c'horf marv zoken, gant c'hoantoù tomm ar vuhez. Skleur an aon a oa bremañ en daoulagad gwechall ken drant, met flour biskoazh flouroc'h e tispake ar rodelloù gell a-zindan al lienoù du, ha rusoc'h c'hoazh e skede ar muzelloù koant. « Ya, » emeve, oc'h ober ur sell glac'haret ouzh an hini marv, « va c'hoant a oa lavarout trugarez dezhañ. ha chom eurvezhioù hag eurvezhioù en e gichen da selaou e guzulioù madelezhus, hogen re ziwezhat on deut. Kement a c'hellan ober bremañ a zo lakaat war ar paper skeudenn an dremm garet kent na vo kaset d'an douar. » Ha pa rae ar plac'h yaouank ya gant he fenn e tennis ur follenn eus va sac'h hag en em lakais da dresañ. Krenañ 'rae va dorn, avat, ha n'oufen touiñ e oa gant an Ankou hepken e oan fromet.

A-greiz-holl e savas er porzh ur vouezh a anavezis diouzhtu evel mouezh ar Junker Wulf. Ur c'hi a yudas, evel p'en defe tapet un taol troad pe un taol skourjez, ha diouzhtu goude e tarzhas ur c'hoarzhadenn ; ha mouezh ar c'hoarzhher a anavezis ivez. Treiñ a ris ouzh Katharina : spouronet e pare he daoulagad war an nor, hogen e-biou e tremenas an dud hep antreal. Dont a reas neuze ar plac'h yaouank em c'hichen, ha sellout ouzh ar skeudenn a gemere tammig-ha-tammig he stumm. A-benn ur pennad avat e voe klevet kammedoù adarre : spontet-holl e lakaas Katharina he dorn war va skoaz hag he c'horf a-bezh a santis o skrijañ. Rust e voe digoret dor ar chapel ha war

an treuzoù en em ziskouezas ar Junker Wulf, ken ruz ha ken koëñvet e fas e gwirionez m'am boe poan ouzh e anavezout. « Arsa 'ta, » a youc'has diouzhtu, « daoust ha chom a ri a-hed an devezh da grial ha da leñvañ e-tal an arched ? Deuet eo ar Junker Von Der Risch da lavarout pegen glac'haret e oa gant marv an hini kozh ha mat vije bet dit diskenn dezhañ ur banne. » Trumm e kouezhas warnon sell drouk ar Junker. « Wulf, » a lavaras Katharina, « gwelout a rez, Wulf : deut eo Johannes. » Ne soñjas ket ar Junker e talvez e ar boan stardañ din va dorn. « A, a ! ul labous kaer a zo ac'hanout bremañ ha pluennoù brav ac'h eus war da gein, » emezañ, oc'h ober goap war va dilhad. « Moarvat e vo ret lavarout Aotrou pa vo komzet ouzhit bremañ ! »

« Lavarit pezh a blijio deoc'h, » a respontis-me pa voemp aet hon-tri e-maez ar chapel. « En estrenvro e oa seven an holl. Met gouzout a rit koulz ha me pegement a failhan da vab ho tad. »

Sabatuet e voe ar Junker evit doare. « Mat mat... Diskouez deomp petra 'c'h eus desket diwar arc'hant va zad ha brokus e vi gopret. »

Respont a ris am boa bet ar gopr pell amzer a oa. Lavarout a reas ar Junker avat e oufe en em ren evel un denjentil, ken e c'houlennis peseurt labour en doa da reiñ din d'ober.

« Anavezout a rez mat doareoù an tiegezhioù nobl, » emezañ en ur sellout kriz ouzh e c'hoar. « Pa ya ar bennhêrez da chom gant he fried, e vez dav mirout he skeudenn e ti he zud. »

Santout a ris Katharina, hag a gerzhe em c'hichen, o kregiñ em brech evel pa vefe bet darev da semplañ. Sioul e chomis avat. « Anavezout a ran, Junker Wulf. Ha neuze ? »

« Neuze, » a youc'has. evel p'en dije gortozet unan bennak da vont a-enep dezhañ, « neuze eo poent bras dit tresañ skeudenn ar plac'h-mañ. » Skrijañ a ris, spontet gant ar c'homzoù ha gant an doare ma oant bet distaget. C'hoant am boe lavarout e vije bet gwelloc'h gortoz un tammig hogen pa rae din



Katharina selloù aspedus ne respontis ken : « Ma teurvez ho c'hoar reiñ din aotre e tiskouezin deoc'h n'eo ket koll va amzer am eus graet o vont en estrenvro diwar goust ho tad. Lakait renkañ evidon ar gambrig a-us d'an nor-dal, ha graet e vezo evel ma c'houlennit ». Laouen e voe ar Junker Wulf gant va respont ha lavarout a reas d'e c'hoar e ve ret kas ac'hanon da zebrin va merenn. C'hoant am boe goulenn pe vare e vefen da gregin gant va labour hogen ker bras ul levezet a oa savet ennon en un taol m'am boe aon he diskouez : furoc'h e kavis tevel, ha bale sioul etre ar Junker hag e c'hoar. N'em boa ket taolet evezh, avat, ouzh an daou gi bras a oa e-tal ar puñs o sorañ war ar vein tomm ha pa zeujomp tostoc'h dezho e tilammjont a-razaill warnon. Ur griadenn ankeniet a zeuas gant Katharina, hogen a-walc'h e oa bet d'ar Junker leuskel ur sakreadenn evit ma teufe ar chas d'en em stlejañ dirazañ en ur speunial. « Diaouled villiget, » emezañ en ur c'hoarzhin, « boued an ifern ma 'z oc'h ! Pilhoù ar glaskerien-vara ha dilhad kran mezer Flandrez'zo memes tra deoc'h ! »

« M'hoc'h eus c'hoant e teufen ur wech all d'ho kaout, Junker Wulf, e rafec'h mat deskiñ dezho bezañ dereat, » a c'harmis kounnaret.

Treiñ a reas ar Junker e zaoulagad bihan sot war-du ennon en ur sachañ war e vourroù. « E-giz-mañ e lavaront demat d'an dud, » a skrignas en ur flourañ kein e chas. « Ha mat a reont : evit ma ouezo an holl ez eo kemmet an traoù en ti-mañ hag e vo kaset d'an ifern kement hini a gredo sevel a-enep din ! » Hag ez eas kuit, e zaou gi gantañ war e lerc'h. Ur pennad e chomis da sellout outañ o pellaat. Ha neuze, da heul Katharina stouet he fenn, e pignis gant an dirioù a gas, e skeud ar gwez-tilh, betek ar maner. Dilavar ez ejomp e-barzh an trepas, ha dilavar e-barzh kambr an Aotrou Gerhardus.

Eno e oa c'hoazh pep tra evel a-raok. Ar pallennoù ler, lufrus ar bleunioù aour warno, a oa ouzh ar mogerioù ; al levrioù

keinnet-brav war ar staligennoù ; a-us d'an daol al livadur kaer gant Ruysdel gozh : kement-se a oa chomet heñvel. Ar gador vras avat a oa goullo bremañ, hag evel ar c'horf er chapel e oa ar gambr, divuhez ha diene, zoken pa sile enni dre greiz ar c'hoad bannoù laouen an nevez-hañv.

Treiñ a ris war-du Katharina. Difiñv e oa manet e-kreiz ar sal, he brennid o trelañ dindan he daouarn juntet. « N'eus den ebet amañ. den ebet, » a hiboudas. « Den ebet nemet va breur hag e chas ferv. »

« Katharina ! » a c'harmis. « Petra 'zo, Katharina ? Petra c'hoarvez en ti-mañ ? »

« Petra c'hoarvez, Johannes ? » Taer e krogas em daouarn, kounnaret ha doaniet he selloù. « Nann, nann, gortozomp ken na vo bet kaset va zad d'e doull-bez. Met neuze, Johannes, ro skoazell din, ro skoazell din. »

Dont a reas an dour em daoulagad ha touiñ a ris da Gatharina e c'helle kaout fiziañs ennon. Hag en ur gichen e chomjomp azezet pell. o komz diwar-benn an hini marv.

Diwezhatoc'h, ha ni er sal vras neuze, e c'houlennis keloù eus an dimezell gozh.

« Tintin Ursul ! » a lavaras Katharina. « Karout a rafec'h lavarout demat dezhi ? Ya. amañ 'mañ atav, met ne da ket mui kalz er-maez eus he c'hambr, rak tenn e vez dezhi sevel gant an dirioù. »

Kambrig an dintin a zigore he frenestr war al liorz, ul liorz glas-tener he girzhier ha kaer-skedus an tulipez enni, hag e-kreiz ar gambrig e oa azezet tintin Ursul, munut-munut en he dilhad-kañv, dirak ur c'hoari echedoù. (Hemañ, a gontas-hi din diwezhatoc'h, a oa bet degaset dezhi eus Lubeck gant an Aotrou Baron, rak Baron e oa deut da vezañ evit mat goude marv e dad. ) Sevel a reas he fenn pa zeuis tre hogen ne baouezas ket a renkañ ar bolomoùigoù evit keloù-se.

« Arsa 'ta, » emezi goude m'he doe Katharina lavaret va anv, « deut out en-dro, Johannes ? – Nann, arabat fiñval

hennezh. **Oh ! C'est un jeu très compliqué<sup>3</sup> !** » Stlepel a reas ar bolomoùigoù mesk-ha-mesk ha sellout a-bann ouzhin neuze. « Ya, ya ! Fichet-kaer ez out. Daoust ha gouzout a rez, avat, eo deut an Ankou en ti-mañ ? »

« Tuchantik ne ouien ket. » a respontis, « hogen bremañ 'ouzon avat. »

« Mat, mat, » emezi. Hag e reas un hej d'he fenn evit diskouez na dalveze ket ar boan teurel evezh bras ouzh pezh a raen. « Gwir eo n'out tra en ti-mañ. N'out ket mevel ganeomp zoken. » Diouzh ar mousc'hoarzhig a baras war muzell disliv Katharina e komprenis na oa ket ezhomm respont. Lavarout a ris hepken d'an dimezell e oa plijus-bras he c'hamb, gant an iliavenn gozh a greske 'kichen ar prenestr hag a vrañskelle he barroù glas dirak ar gwerennoù. Ar gwir a oa ganin, eme dintin Ursul. Padal e oa hegasus an eostiged a neizhie en iliavenn, rak kement a cholori a veze ganto da noz ma virent outi alies da gousket. Ha neuze ne c'hoarveze tra el liorz, nemet pa zeue paotrig ar vereuri da c'hwennat ar riblennadoù beuz. Hag evel-se ez echuas ar weladenn, rak poent e oa din, a gemennas Katharina, mont da zebriñ va lein ha da ziskuizhañ va c'horf.

\*

\* \*

Hag a-nevez e veven er gambrig a-us d'an nor-dal. Evit brasañ levezet Dietrich kozh, rak bemnoz e chomemp azezet en ur gichen war ar c'houfr bras, eñ o kontañ istorioù ha me o selaou, evel en amzer wechall. Lakaet gantañ ur c'horniad mat – gant ar soudarded e oa deut ar boaz butuniñ – e tisplege ur bern koñchennoù diwar-benn ar reuz hag ar freuzh a oa bet er vro e-doug ar brezel. Un deiz avat m'am boa lakaet ar gaoz war an dimezell Katharina, setu ma chomas ur pennadig da sellout

---

3 galleg : diaes-bras ar c'hoari-mañ, avat !

iskis ouzhin. « N'oufec'h gouzout, aotrou Johannes, » emezañ en diwezh, « pegen mantrus eo n'eus ket ganeoc'h un anv nobl evel gant ar Von Der Risch ! » Ha pa save ar ruz d'am divjod e lavaras raktal, o skeiñ un taol kreñv war va skoaz : « Ale 'ta, Aotrou Johannes, ur sotoni 'zo deut ganin, genaoueg kozh ma 'z on. 'Vel just eo ret dimp-ni, an dud izel, daremprediñ tud izel hepken ». Ne gredan ket e voen ali-tre gantañ, met ne lavarais netra.

Goulenn a ris avat penaos e oa ar bed gant ar Von Der Risch. Ur sellad goapaus a reas ouzhin an den kozh. « Karout a rafec'h gouzout, Aotrou Johannes ? Ma, ur paotr yaouank laouen eo anezhañ, hag a oar kemer plijadur forzh pegement. En deizioù ened da skouer ez a e kêr da droc'hañ an nozelennoù a dennoù pistolenn diwar dilhad ar vourc'hizien : setu ar c'hoari nevez. Ha gouzout a ra tennañ gant ar bistolenn, kredit ac'hanon. War ar seniñ violoñs n'eo ket ken ampart, hag a-bell. Pa gar ar sonerezh, avat, ez eo aet an noz all da zihuniñ ar mestr-muzisian a zo o chom e straed an Holsten ; **octavis tritun regum** e oa, yen-skorn anezhañ, hogen n'en doe ket ar paour kaezh muziker amzer da wiskañ e otoù zoken : kaset e voe da seniñ dre ruioù kêr, war lost e roched, ar Junker gant e gleze war e lerc'h. Traoù all a vo kontet deoc'h ? Eurus en em gav e verourien pa n'eus merc'h ebet en o zi, ha koulskoude... Hogen arc'hant en deus bremañ, leizh e c'hodell, ha n'en deus ket gortozet e vije marv e dad evit foraniñ an darn wellañ eus e vadoù. » Anaout a raen bremañ doare ar Junker. Hag hervez e gustum ez echuas Dietrich evel-hen : « Hogen ne don-me nemet un den paour ».

War un dro gant va reizhoù-livañ e voe degaset din eus kêr va dilhad ivez, ken e c'hellis en em wiskañ e du, e-giz ma oa dereat. Ha gouzout a ris implijout mat va amzer. Bemdeiz ez aen da labourat er penn bras hag uhel, sko ouzh kambr an Aotrou Gerhardus, a oa ennañ poltreoù an tiegezh. Mamm Gatharina, aet re abred da anaon, ha va mestr karet, e brud e

oad-gour, a oa eno, livet o skeudennoù gant Georg Ovens eus Eiderstedt : diwar poltred va madoberour e kemeris. buanha-buan, an nebeut notennoù a servijas din, diwezhatoc'h, d'ober an daolenn a zo bremañ em c'hambr hag a chom kompagnunezh wellañ va c'hozhni. Evit e verc'h, bevañ a ra he skeudenn ganin e don va c'halon.

Alies, echu ganin ober gant ar barr-livañ, e chomen da sellout ouzh ar poltredoù kaer. Anat e tenne Katharina d'he c'herent : tal he zad he doa, ha diweuz loavus he mamm. Digant piv avat e oa deut d'ar Junker Wulf e zaoulagad bihan drouk hag e veg kammet-kriz ? Pell en amzer-dremenet e oa ret mont da glask : goustad e saven a-hed ar steudad poltredoù ken ez erruen dirak un daolenn gozh, krignet gant ar preved he framm prenn-du, hag a sponte ac'hanon dija pa zeuen, bugelig, da welout ar skeudennoù : poltred un itron e-tro an daou-ugent vloaz, ganti ur skleur garv en he selloù louet hag ur risign didruez war he muzelloù. « Honnezh eo, » a lavaren a vouezh izel en ur skrijañ. « Pegen kevrinus eo nerzh ar gwad. E-pad un c'hantved e chom kuzhet ar si fall ha trumm en em ziskouez adarre evit ober gwalleur an holl. N'eo ket a-enep da vab an Aotrou Gerhardus em bo da stourm, met a-enep da houmañ drouk ha d'he mab-bihan. » Ha siouloc'h va c'halon e teuen en-dro dirak an daou boltred a lakae ennon levezeh ha dudi. Evel-se e tremenen va amzer er sal didrouz, netra war va zro nemet ar poltredoù kozh hag an euflennoù a gorolle war bannoù an heol.

Ne welen Katharina nemet er sal-debriñ. Ha neuze e oa an dintin en eil tu dezhi, hag ar Junker en tu all. E gwir, ken trist e veze ar seurt predoù, pa ne zibabe ket an dimezell hon dihuniñ gant he mouezhig trenk, ma kinnige ar boued chom em c'horzailhenn : rak evel enebourien e oa ar breur hag ar c'hoar dirazon. Katharina ne gemere ket ar boan zoken da zebriñ begad ebet : kerkent ha ma c'helle e save diouzh taol, oc'h ober din kenavo gant he fenn. Ar Junker, avat, pa droe en

e spered, a rae din chom gantañ da evañ banneoù, rak plijadur en deveze oc'h ober goap warnon.

Nebeut goude e voe diskennet korf an Aotrou Gerhardus e bez ar chapelig e-kichen e hendadoù. – salv ma c'hellint holl, un deiz, dihuniñ e levezet an Aotrou – hag a bep lec'h e teuas tud en o dilhad-kañv. Kerent a-dost ne oant ket, avat, rak ar Junker Wulf a oa pennhêr diwezhañ al lignez ha gwreg an Aotrou Gerhardus a oa bet ganet en ur vro all ; hag a-se ne chomas gour anezho er c'hastell goude an obidoù.

Neuze 'rankis, war urzh ar Junker, kregiñ diouzhtu gant va labour. Va flas am boa dibabet pell a oa e sal ar poltreoù e-tal ur prenestr troet war-du an hanternoz. Klemm a reas tintin Ursul, o lavarout e oa diaes dezhi bale gant ar remm, hag e rafen gwelloc'h labourat en he c'hambr pe er gambr e-kichen : evel-se, a zisplege-hi. e vefe tu da fistilhat hag e kavfemp, an holl ac'hanomp, berroc'h hon amzer. Re laouen e oan, avat, o kaout an disamm eus an hini gozh : krenn ha krak e respontis na oa ket tu da gavout lec'h dereatoc'h eget an hini am boa dibabet er penn bras, hag aner e voe dezhi sarmonal pelloc'h. Hep an disterañ dale, a-hend-all, e kasis da sal ar poltreoù ar pikol marc'h-koad a oa bet fardet ganin-me ha gant Dietrich kozh en devezhioù a-raok.

Edon o paouez stegnañ al lienenn war he stern pa voe digoret an nor ha pa zeuas tre Katharina. Diaes e vefe din displegañ perak, hogen spouronet e oamp oc'h en em gavout penn ouzh penn. Ha hi gwisket c'hoazh en he dilhad kañv, a bare warnon selloù trelatet.

« Katharina, » emeve, « gouzout a rit em eus bet an urzh d'ober ho poltred. Plijout a ra an dra-se deoc'h ? »

Tristoc'h c'hoazh e teuas da vezañ he daoulagad gell hag izel e tistagas :

« Johannes ! C'hwi an hini eo a c'houlenn ! »

Evel glizh ar baradoz e kouezhas he c'homzoù war va c'halon.

« Gouzout a ran, Katharina, gouzout a ran. Hogen penaos e c'hellan ho skoazellañ ? Azezit buan, avat, rak aon na zeufe unan bennak. ha neuze kontit din pep tra. »

Ne azezas ket. Taer e teuas tostoc'h ouzhin.

« Gwechall hoc'h eus lazhet ar barged, Johannes, soñj hoc'h eus ? N'ho po ket ezhomm ober heñvel an taol-mañ, rak n'on ket me ul labousig aes da vezañ paket. Gouzout a rin en em zifenn ouzh ar barged. Er gêr, avat, emañ va gwashañ enebour. » « Ho preur, Katharina ? »

« Va breur. Lakaet en deus en e benn ober din dimeziñ gant un den am eus kasoni outañ, am eus doñjer outañ. Abaoe m'eo bet tapet klañv va zad em eus stourmet bemdeiz ha bemdeiz, ha dirak an arched hepken em eus tizhet kaout ar gwir da leñvañ e peoc'h. Hogen ne vezo ket va breur feal d'e c'her, gouzout a ouzon mat ! »

Trumm e teuas soñj din e oa c'hoar nemeti an Aotrou Gerhardus e penn ur gouent e Preetz. Gwellañ he defe d'ober, emeve da Gatharina, a vefe goulenn bod ganti.

« Asantiñ a rafec'h mont d'he c'haout eus va ferzh, Johannes ? Skrivañ dezhi m eus graet ur wech, met gant Wulf eo degouezhet ar respont, ha kement e youc'has va breur ma 'z eo souezh na voe ket dihunet va zad, hag eñ marv, gant e vallozhioù. » Pedit a ris Katharina da azezañ e-tal din ha buan e krogis da dresañ linennoù kentañ he skeudenn : evel-se e c'helljomp divizout e peoc'h. Ul lizher all a rafe Katharina ha ganin e vefe kaset d'he moereb pa 'z afen da Hambourg da brenañ ur framm skultet evit an daolenn. Met a-raok pep tra e oa ret ober ar poltred.

\*

\* \*

Iskisar froudenn a boulz an den, alies, da ziskar gant e zaouarn ar pezh end-eeun emañ o klask sevel. Gouzout a ouie

mat ar Junker e oan keneil bras gant e c'hoar ha koulskoude ne zirenkas morse ac'hanomp e-pad an eurvezhioù a dremenemp a-gevret e sal vras ar poltreoù. Fae a rae warnon, moarvat, pe neuze e kave dezhañ e oan bet spontet a-walc'h gantañ ha gant e chas. Ur wech hepken e teuas d'ober trouz ouzh Katharina dre ma chome atav en he dilhad du ha kercent goude ez eas kuit en ur c'hwibanañ. Ur wech all e tegasas ar Von Der Risch da welout ac'hanomp. Kinnig a reas Katharina lammat kuit diwar he c'hador pa welas ar fri-erer ; war va fedenn, avat, e chomas en he flas hag e padis-me da liveañ ken sioul ha tra. Abaoe ma oa bet diskennet an Aotrou Gerhardus en e vez ne oa ket bet gwelet er maner al liv eus ar Junker Kurt. Dont a reas 'ta da sellout ouzh ar poltred, ha lavarout un nebeut traoù seven ; bravoc'h e vije bet, emezañ, m'he dije an dimezell diskouezet he blev kaer flour e-lec'h pakañ anezho ken strizh en ur penn-kab du. Neuze e savas, yen-skorn, mouezh Katharina ; « Setu amañ va zad, Aotrou », emezi en ur ziskouez an daolenn vras. « Marteze hoc'h eus disoñjet ez eo marv ! » N'ouzon ket Petra 'respontas ar Von Der Risch. Pezh a ouzon mat eo na daolas evezh ouzhin tamm ebet : moarvat e oan, evit ar Junker, ur seurt benveg a rae d'ar skeudenn en em liveañ anezhi hec'h-unan. Un nebeut gourc'hemennoù plijus a zeuas gantañ c'hoazh hogen pa chome Katharina hep rannañ ger e voe ret-mat dezhañ mont kuit : pezh a reas, e lagad o pouezañ drouk warnon tra ma hete d'an dimezell kaout kalz plijadur. Ha goude-se ne voe mui gwelet Junker ebet er penn bras.

Sioul e tremenas an devezhioù. Ha buan ivez, siwazh ; ken e weljomp re abred ar segal o kreskiñ er parkoù 'tal ar c'hoad hag ar roz o tiflukañ el liorz. Echu an daolenn, e oa poent din mont gant va zroiad da Hambourg.

A-raok azezañ dirazon evit ar wech diwezhañ – an deiz war-lerc'h e oan da gemer penn va hent – e roas din Katharina al lizher evit he moereb. Trist e oamp hon-daou ha gwall-nebeut e komzemp. A-daol-trumm, a-greiz liveañ, e kouezhas va selloù



war poltred an itron gozh ha ker fromet e voen gant doare kriz he daoulagad ma voe darbet din ober ul lamm diwar va c'hador.

« Petra zo. Johannes, » eme vouezh sklintin Katharina, « dont a rit gwenn evel pa vefec'h klañv ? »

Gant va barrig e tiskouezis ar skeudenn. « Anaout a rit honnezh, Katharina ? An holl amzer m'omp bet amañ he deus sellet ouzhomp. »

« Honnezh ! Pa oan bihan e oan ken spontet ganti ma klozen va daoulagad bewech ma ranken treuziñ ar penn-mañ. Mestrez eo bet er c'hastell ouzhpenn kant vloaz a zo... »

« N'eo ket koant evel ho mamm. na tener kennebeut. Surmat, honnezh a ouie lavarout nann, krenn ha krak, pa blijedezhi. »

« Mallozhet he deus he merc'h, » eme Gatharina, leun he daoulagad a velkoni, « hag an deiz war-lerc'h eo bet kavet korf ar plac'h yaouank er poull-dour a oa gwechall e-kichen ar c'hoad. »

« E-lec'h ma kresk hiziv balan ha broenn ? »

« Ya, Johannes, hag eno ivez en em ziskouez ur vaouez wenn bewech ma tle c'hoarvezout ur gwallur er gêr. »

Adarre e sellis ouzh ar poltred kozh.

« Ha perak ar seurt mallozh ? » a c'houlennis.

« Perak ? » Ne gredas ket Katharina respont diouzhtu. « Lavaret e vez, » emezi, o termal, ha morse n'am boa kavet anezhi koantoc'h, « lavaret e vez he doa nac'het ar verc'h dimeziñ gant ur c'henderv d'he mamm. »

« Ken divalav-se e oa ar paotr ? »

Evel ur bedenn e savas Katharina he daoulagad davedon.

« N'ouzon ket, » a lavaras izel-izel, ruz-holl he divjod. « Karout a rae un den all. » Hag izeloc'h c'hoazh, ken n'am boe poan o tapout ster he c'homzoù : « Met hi a oa nobl, hag an den all ne oa ket ». Ha stouet he fenn ganti e chome ken difiñv ma vije bet kredet e oa aet divuhez.

Ma rankis lavarout : « Sellit ouzhin mar plij Katharina, rak n'on ket evel-se evit livañ ken ho skeudenn ».

Ha pa savas he fenn, pa ziskouezas he daoulagad gell, e komprenis na c'helle mui tra ebet bezañ kuzhet.

« Katharina, » a c'harmis, « o lammat em sav, ha mallozhet e vefes bet, te ivez ? »

Huanadiñ a reas. « Mallozhet on bet me ivez, Johannes. » Souchañ a reas ouzh va bruched hag an eil etre divrec'h egile en em gavjomp dirak poltred kozh ar vaouez kriz he daoulagad. « Arabat ober an heg outi, va Johannes, » eme Gatharina karantezus, ha pelloc'hik en distro ez ejomp.

A-greiz-holl e savas en trepas un trouz iskis, evel pa vije bet ul loen bennak o vale war dri zroad. Amzer he doa bet Katharina da vont en he c'hoazez adarre ha me da gemer endro va barrig-livañ, pa zigoras an nor ha pa weljomp, evit hor brasañ sebez, tintin Ursul o tont tre, harpet war he bazh ha munidik he c'hammedoù. « Klevet em eus, » emezi berr hec'h anal, « ez eo echu da labour ganit ha ret-mat eo din memes tra teurel ur sell war an daolenn. » Bremañ. gouzout a oar an holl pegen gouiziek e vez ar plac'hed yaouank kozh war traoù ar garantez ha pegen alies e tegasont trubuilh d'an amourouzien. N'he doe ket tintin Ursul gwelet mat ar poltred ma c'houlennas feuket-tre : « Spi am eus n'eo ket e-giz-mañ e selle Katharina ouzhit pa oas o livañ he skeudenn » ? Respont a ris e oa labour an arzour lakaat buhez er pezh a drese, met re skedus e oa hon daoulagad moarvat ha re roz hon divjod, rak diouzhtu e kounnaras an dimezell : « N'eo ket bet yac'hus dit, Katharina, chom azezet keit amzer hep fiñval : liv an derzhienn a zo ganit !... Met echu eo ar skeudenn, keta ? » Ne chome mui tra d'ober, emeve, nemet lakaat, amañ hag ahont, un tammig liv en traoñ. « Neuze n'eus ket ezhomm ken eus an dimezell evit keloù-se... Katharina, deuit da gas ac'hanon betek va c'hambr : aesoc'h vo din ho prec'h eget ar gozh vazh-mañ. »

Hag e rankis lezel va muiañ-karet da vont kuit gant ar sec'henn sot drouk. A-vec'h ma c'hellas an daoulagad gell ober din ur c'henavo karget a garantez.

Mintin mat an deiz war-lerc'h e kemeris penn va hent. Ur marc'h a oa bet dibret evidon gant Dietrich ha d'ar piltrotig e treuzen ar saprenneg p'en em stlapas a-razailh koun ar Junker Wulf ouzh molinodoù va loen : ar jav a anavezent, met an den a oa warnañ ne oant ket evit gouzañv. Dibistig en em dennjomp, avat, va marc'h ha me, ha goude un droiad plijus dre greiz ar maezioù, ez erruemp da noz en Hambourg.

Ne voen ket pell antronoz o kavout ur skulter : hennezh zoken a oa gantañ un niver bannoù kizellet prest da vezañ gwerzhet ha kement a chome d'ober a oa troc'hañ anezho diouzh ar vent, o stagañ an eil ouzh egile e stumm ur framm ha kinklañ neuze ar c'hornioù anezhañ. War an taol e voe graet marc'had hag abred en em gavis dieub da bourmen e kêr.

Eno e oa traoù marzhus da vezañ gwelet : kib arc'hant ar morbreizher Störtebecker da skouer, pe c'hoazh ar pesk iskis dezhañ divaskell ha skilfoù e-giz d'un erer a oa bet nevez-paket er stêr Elbe hag a oa, gouez d'an dud, evel diougan un trec'h bras war an Durked. Met re brederiet e oa va ene evit ma chomfen da straniñ. Rak-se, paet diouzhtu ganin va notenn en ostaleri ha kemmet va lizher-arc'hant evit ur rollad pezhioù aour e kuitaen, a-raok kreisteiz, safar ar gêr vras.

Un nebeut eurvezhioù goude ez erruen e Preetz, ez aen da skeiñ ouzh dor vras ar gouent hag e oan degemeret gant ar chaloniez. Anat e oa, diouzh he doareoù meurdezus, e oa hi c'hoar an Aotrou Gerhardus : eston e tenne d'am madoberour daoust ma oa deut he dremm garvoc'h un disterig gant an oad, e-giz ma c'hoarvez alies d'an dud dizemez. Reiñ a ris dezhi al lizher ha neuze e rankis respont dre an hir d'ur bern goulennoù. Goude-se avat e prometas skoazellañ he nizez ha tra ma skrive un nebeut gerioù da Gatharina e oan-me kaset da zebriñ ul lein eus ar re wellañ.

Diwezhat e oa pa gemeris en-dro penn va hent ha koulskoude, daoust ma oa skuizh-bras va marc'h, em boa spi bezañ er gêr a-raok hanternoz. Sioul e oan. Rak en ur sac'hig ler war va bruched e oa al lizher a lakafe ur fin da enkreziou Katharina.

Klouar e oa an noz. Eus ar parkeier e save frond ar bleuñv gouez, war ar girzhier e taole ar gwezvoud o c'hwez-vat ha, kuitaet ganto goudor an deliou, e teue ar balafenned-noz da zarnijal hegasus e-tal divfron va marc'h. Uhel-uhel en oabl glas-teñval, diouzh tu ar gevred, e skede an Alarc'h en e veurdez kann.

Erru e oan war douarou an Aotrou Gerhardus ha neuze. da virout a goll amzer, e ris va soñj mont diouzhtu betek an ostaleri, a zo kalzik en distro eus an hent bras, ha lavarout da Hans Ottsen, an ostiz, kas un den an deiz war-lerc'h betek ar gêriadenn da gerc'hat ar voest vras a vefe degaset evidon eus Hambourg : skeiñ ouzh e brenestr a rafen, emeve din vavanan, ha kemenn berr-ha-berr dezhañ va c'hefridi. Treiñ a ris 'ta penn d'am marc'h, ha diskenn primik dre greiz ar c'hoad.

Sioul e oa pep tra, ur bam, ha pa gouezhas eus tour an iliz daouzek taol kreiznoz, ne voen ket evit chom hep lavarout a vouezh uhel : « Kousket e peoc'h emañ an holl : ar re varv er vered, hag ar re baour en o lochenn ». Hag ar c'hwibu, zoken, o c'hoari skedus war va zro, a nije didrouz ivez.

Pa erruis e-tal ar poull-dour a sav ti Hans Ottsen en tu all dezhañ, avat, e voen souezhet-mik o welout ur skleur ruz dirak an davarn hag o klevout son ar violoñs o tont diouti. Re ziwezhat e oa evit chench menoz hag a-hend-all ne felle ket din dont en-dro an deiz war-lerc'h. Ober a ris tro al lenn, kas va marc'h d'ar staol ha mont el lab da welout. Eno e oa un niver tud o 'n em zifretañ gwashañ ma ouient, cholori bras ganto, en o zouez lakepoded barvet ha kleizennet o dremmoù n'en dije karet den erruout ganto e-kreiz ur c'hoad. N'eo ket kouerien yaouank ha foeterien-hent hepken a oa deut di,

avat : e traoñ ar sal, en e sav e-kichen tonelloù ar sonerien, e oa Kurt Von Der Risch, ur mell plac'h tev gantañ etre e zivrec'h. Met evit doare ne blije ket tamm ar muzik d'ar Junker : skeiñ un taol-dorn war ar violoñs tostañ dezhañ a reas, stlepel un dousennad pezhioù aour ouzh fas an den ha goulenn ar bale-daou diouzh ar c'hiz. Diouzhtu e krogas ar baotred da seniñ an ton nevez hag evel tud posedet en em daolas ar Junker hag e cheorenn e-touez ar gouerien baour sabatuet.

N'oulen ket chom da sellout : diouzhtu ez is er sal a-dreñv da gaout an ostiz met eno siwazh e kavis ar Junker Wulf, a gemere kalz plijadur oc'h atahinañ Ottsen gozh : kinnig a rae kreskiñ dezhañ priz e feurm ha neuze e tarzhe da c'hoarzhin pa gleve Hans Ottsen o leñvañ hag o c'houlenn truez. Va rediañ a reas ar Junker da azezañ en e gichen da gaout ur banne ha diouzhtu e stagas da c'houlenn keloù eus va beaj hag eus merc'hed koant Hambourg. Ne respontis ket kalz tra, nemet e oa prest ar framm, hag e rankfe an tavarnour kas unan bennak da gerc'hat anezhañ an deiz war-lerc'h.

Pa oan oc'h en em glevout da vat gant an ostiz, setu ma tegouezhas ar Von Der Risch. Evañ en doa c'hoant. E dapout dre e vrec'h a reas ar Junker Wulf hag ober dezhañ azezañ. « Arsa, Kurt ! » emezañ gant mouezh raouet ur mezhvier, « daoust ha n'out ket aet skuizh c'hoazh gant ar merc'hed ? Petra 'lâro Katharina ma n'out ket furoc'h ? Chom 'ta ganeomp da c'hoari c'hartoù à **la mode**<sup>4</sup>... » Hag hep gortoz asant egile e tennas kartoù a-zindan e chupenn. « **Allons donc ! Dix et dame ! Dame et valet !** <sup>5</sup> »

Ha me sellout outo, ur c'hoant hepken ennon : skarzhañ kuit kerkent ha ma kavfen va zu. Gant ar mezhvier e oa ar chañs, ha ne rae ar Von Der Risch nemet koll. « Arabat dit fachañ, Kurt ! » a lavare ar Junker Wulf en ur zastum e

4 galleg : diouzh ar c'hiz.

5 galleg : « Dav dezhi ! Dek ha damez ! Damez ha lakez ! »

wenneien « Chañs er garantez ha chañs er c'hoari a zo re evit ar memes kañfard. Goulenn 'ta keloù eus da cheorenn gant al livour amañ : hennezh a anavez anezhi penn-da-benn ha dre an eñvor. Ha te, paotr kaezh, a dremeno goude an arz ! »

N'en doa ar Junker Kurt abeg ebet da vezañ laouen gant e chañs er garantez. Ur mell lop a skoas war an daol en ur ober ouzhin selloù drouk kounnaret.

« A ! a ! Gwarizi 'zo ennout, va faotr, » eme ar Junker Wulf diduet-holl. « Ur c'heloù 'vat am eus evidout, paotr paour, hag a raio kalz plijadur dit : echu eo ar poltred. Hiziv eo bet da vignon al livour en Hambourg o tibab ur framm evitañ. »

Ul lamm a reas ar Von Der Risch evel ur c'hi o klevout c'hwez ar jiboez. « En Hambourg ! Neuze e oa mantell Faustus gantañ war e gein, rak e Preetz eo bet gwelet gant va faotr-karr. Aet e oa da gaout da voereb en he c'houent. »

Lakaat a ris va dorn war va brennid rak kel lemm e pare ar Junker Wulf e zaoulagad warnon ma krede din e wele al lizher a-dreuz d'am dilhad.

« Oc'ho ! » a c'harmas ar mezhvier en ur deurel e gartoù war an daol. « Da gaout va moereb ? Peseurt traoù vil emhout oc'h ober aze, lampon ? Piv en deus lavaret dit mont da Breetz ? »

« N'eo ket c'hwi, a dra sur, » a respontis, ha diouzhtu e kasis va dorn d'am c'hostez. Siwazh, lezet e oa bet va c'hleze er staol, ouzh dibr va marc'h.

Hag ar Junker da youc'hal d'e vignon. « Tap anezhañ, Kurt ! Digor dezhañ e chupenn ! Aze 'kavi traoù brav ! »

En em stlepel warnon a reas ar Von Der Risch met paotr e oan d'en em gannañ : tapout a ris peg en e zivrec'h ha, torret e nerzh dezhañ, ne c'hellas mui ober tra nemet diskrognal e zent ouzhin. E-keit-se e rae ar Junker Wulf eus e wellañ da vont en e sav ha da zont war skoazell e vignon : kement en doa karget e gof gant boeson, avat, ma ne oa ket mui e zivesker evit dougen anezhañ, hag a-greiz dispac'hat war e gador e youc'he gwashañ m'helle : « Ale 'ta, Tartar, Turk !

Deuit amañ 'ta, Tartar, Turk » ! N'em boa ket amzer da goll ma felle din saveteiñ va buhez : klevout a raen an daou gi ferv o tont a-dizh dre greiz an dañserien. Trumm e stlapis va enebour d'an douar, ober ul lamm dre an nor a-dreñv ha tec'hout d'ar red.

Hag a-nevez e oa pep tra sioul en-dro din. Ne gredis ket mont da gemer va jav er staol. Sevel a ris dreist ur voger ha skampañ, a-dreuz ar c'hoad, war-du ar strouezhegi en em astenn tre betek al liorz. Du-pok e oa dindan ar gwez, hogen a-nebeudig e teuas va daoulagad d'en em ober ouzh an deñvalijenn ha, pa santen al lizher e surentez e diabarzh va chupenn, ne chomen ket da droiata. Va soñj a oa tremen an nozvezh em c'hambri ha pediñ goude-se Dietrich kozh da gas ar c'heleier da Gatharina : rak anat e oa din na c'hellfen ket chom pelloc'h er maner.

Gwech an amzer e raen un ehan da selaou. Moarvat ne oa ket bet lakaet ar chas diouzhtu war va lerc'h, rak ne gleven ket anezho o harzhal zoken : ne save trouz en noz nemet kan an eostiged ha pa ouien e neizhient e girzhier al liorz, n'em boa ket d'en em c'houlenn dre belec'h 'oa an hent mat.

Hep re soñjal e valeen, loavet gant geiz al laboused, pa glevis trumm yudadennou a reas d'am gwad treiñ da zour em gwazhied : war va roudou e oa ar chas ha gant spont e kleven o lammoù a-dreuz ar bodoù strouezh. A-drugarez-Doue em boe amzer ha nerzh a-walc'h da grimpat dreist ar voger : en tu-hont dezhi, el liorz, e kane c'hoazh an evned. Hag en un taol e teuas koun din eus un nozvezh sioul evel houmañ ma oan o pourmen eno e-ser an Aotrou Gerhardus. « Sell mat ouzh an holl draoù-mañ, Johannes, » a lavare din an den kozh, « rak pa zeui en-dro e c'hell bezañ na vin ket mui bev ha neuze ne vo den evit reiñ degemer dit war treuzoù ar maner. Ne fell ket din avat ez afe diouzh da spered eñvor an ti-mañ hag e liorz. » Ne voen ket evit mirout a c'hoarzhin c'hwerv : rak el lec'h end-eeun ma komze din ken

karantezus an den kozh e oa lakaet an hu warnon evel war ul loen gouez.

Ne oan ket c'hoazh e savete, a-hend-all ; rak toulloù a oa er voger, gouzout a ouien mat, ha ne oa el liorzha nep gwezenn kreñv a-walc'h evit dougen ac'hanon. Goude redek ha diredek ur pennad mat, e kavas ar chas un toull en diwezh : ur sailh a rejont, ha nebeut goude e teredent davedon a lammoù hir. Kollet e oan. N'ouzon penaos e kouezhas neuze va selloù war an iliavenn gozh e-tal kambre tintin Ursul. Pa erruas ar chas war al lec'h e oan savet ken uhel ma n'helljont ober droug ebet din : un tamm eus va mantell, hepken, a yeas ganto.

Nec'het-bras en em c'houlennen petra ober – rak ken moan e oa an iliavenn ma ne greden ket fiñval – pa glevis ur prenestr o tigeriñ a-us d'am penn hag ur vouezh o c'hervel ac'hanon – salv ma c'hellin c'hoazh he c'hlevout pa guitain ar c'hozh tamm douar-mañ – « Johannes ! » a hiboude ar vouezh karet ha goustad e savis a-hed ar c'hef, al labousedigoù o tiflipat a-zindan an deil hag ar chas o yudal spontus en traoñ.

« Katharina ? Te an hini eo, Katharina ? »

« Deus, » emezi, spouronet-mik, en ur sachañ warnon ken na ouie. « Deus, pe lazhet vi ganto. » Kerkent ha me er gambr, avat, ez eas an daouarn munut a-ziwar va divskoaz hag ez en em lezas Katharina da gouezhañ, klos he daoulagad, war ur gador e-tal ar prenestr. Betek he daoulin e tiskenne he blev flour war an hiviz gwenn-kann, ha ken kaer e oa ar plac'h e goulou al loar ma oan evel kilhet gant he c'hened. Trealañ a rae he bruched ha ganti e teuas un huanadenn.

« Katharina, Katharina garet, huñvreal a rit ? » Melkonius ar mousc'hoarzhig a baras neuze wat he muzell.

« Siwazh, Johannes ! Ken kalet eo bevañ, ha ken brav e vefe huñvreal ! »

Ur barrad kounnar a begas adarre er chas.

« Petra 'zo ? » a c'harmas Katharina evel o tihuniñ. « Petra



'zo c'hoarvezet ganeoc'h, Johannes ? » « Katharina, ma hoc'h eus ezhomm eus tra pe dra, goulennit buan ; rak n'eo ket diouzhtu e c'hellin dont en-dro d'ho kaout. Ha neuze, sur, n'eo ket dre an nor e tremenfenn. » Reiñ a ris dezhi al lizher ha kontañ berr-ha-berr penaos e oa savet tabut en davarn etrezon-me hag ar Junkerien.

Lenn a reas skrid he moereb ouzh skleur al loar hag o treiñ davedon daoulagad leun a garantez e verkas din ul lec'h 'tal ar c'hoad bras d'en em gavout antronoz : rak dezhi oa c'hoazh da c'houzout pe vare ez afe kuit ar Junker da foar Gouel-Yann « Bremañ, Katharina, » emeve, « daoust ha n'eus ket en ho kambr un tamm houarn pe un dra bennak a c'hellfe servijout din d'en em zifenn a-enep an daou gi ? »

Skrijañ 'reas.

« Penaos, Johannes ? » a c'harmas, o tapout va daouarn en he re. « N'emaout ket e soñj mont er-maez ? N'ez ket, o, n'ez ket ! Lazhet e vi ganto ha neuze me a varvo ivez. »

Daoulinañ a ris en he c'hichen ha lakaat va fenn war he divronn yaouank.

« Siwazh, Käthe, zoken ma ne vefe ket da vreur o tifenn ouzhimp, n'em befe ket ar gwir da zimeziñ ganit peogwir n'on ket denjentil. »

Kuñv-meurbet e tiskennas he sell warnon. « N'out ket denjentil ? Gwechall, pa oan bihan. e kave din e oas ar bravañ denjentil a zo er bed. Siwazh, va zad a oa mignon d'az tad, setu holl. Ha se ne dalv mann evit an dud. »

« Nann, ne dalv mann, Käthe. Er vro-mañ, da nebeutañ. » Klosoc'h e stardis he c'horf gwerc'h. « Du-hont. avat, e Bro-Holland, n'eo ket heñvel an traoù. Ha doujañs a vez evit al livourien koulz hag evit an dudjentil : un enor bras e vez d'an aotrounez, da skouer, degemer Mynheer Van Dyck en o falezioù... Aes e vo din kaout labour adarre gant va mestr Van Der Helst. Mont a rin kuit va-un e-pad ur bloaz pe zaou, Käthe garet, da c'hounit un tammig arc'hant ha neuze e teuin

en-dro d'ho kerc'hat. Chomit feal din daoust d'ar Junkerien. sed kement a c'houlennan. »

Ur flourig a reas Katharina d'am blev gant he daouarn gwenn. « Ret-mat vo din bezañ da wreg, peogwir out deut e-barzh va c'hamb, » emezi izel-izel en ur ober din dont klosoc'h c'hoazh outi.

Daoust ha kompren a reas pegen mezvet e voen gant he c'homzoù ? Aet simpl va c'halon gant ar garantez, e kuzhis va dremm e barlenn ar plac'h karet-dreist.

Trumm e skiltras un taol-c'hwitell. Tevel a reas ar chas el liorz. Un taol-c'hwitell all, ha sed al loened o vont kuit d'an daoulamm ruz. Un den a zeuas er porzh, pounner e gammedoù, a zigoras un nor hag he morailhas goude-se. Derc'hel a raemp war hon anal.

« Wulf an hini eo, » eme Gatharina, « sparlet en deus ar chas er staol. Ha bremañ eo aet d'e gambr da gousket. »

Adarre e oa sioul-kaer al liorz. Tevel a raemp. Katharina a boueze kil he fenn war kein ar gador, ha ne gleven mui tra nemet tarlamm hon div galon.

« Mont a rin kuit bremañ, Katharina ? » emeve izel.

Ne respontas ket. Lakaat a reas he divrec'h tro-dro d'am gouzoug ha va sachañ tostoc'h outi, ken na voe va diweuz war he diweuz.

Ha ne dis ket kuit.

Eus al liorz e teue betek ennomp geiz an eostiged hag ivez hiboud ar wazhig-dour a gan a-dreñv ar girzhier... Ur frond lug ha tomm a leunie ar gambr. Gant koumoul teñval e oa kuzhet al loar hag ahont, a-us d'ar c'hoad, e luc'hede an noz... O, Aotrou, ken pell e oa ho mouezh !

A-greiz-holl, soñj am eus, e kanas skiltr ur c'hilhog er vereuri. Etre va divrec'h e talc'hen korf ur vaouez disliv, daeroù leun he daoulagad, ha n'oule ket, n'oule ket va lezel da vont. Pa skedas en oabl ruzell ar beure, avat, e kasas-hi ac'hanon kuit, evel spouronet.

Ur pok, kant pok c'hoazh. Ur gerig c'hoazh. Da greisteiz, pa sonfe ar c'hloc'h evit pred ar vevelien, e teufe-hi d'am c'haout er saprenneg. Ha neuze, n'ouzon ket re penaos, en em gavis el liorzh fresk ha mouest gant ar glizh.

Ur wech c'hoazh e welis Katharina oc'h ober din kenavo gant he dorn. Pa drois da sellout war-du an tour kozh, avat, e kredis gwelout e toull ar prenestr un dorn all o c'hourdrouz, un dorn disliv ha treut-eskern evel dorn an Ankou. Soñjai a ris da gentañ e oa tasmant ar vamm-gozh drouk a oa en em ziskouezet. Met diouzhtu goude e voe anat din e oan bet touellet gant va spered fromet.

Ne chomis ket da brederiañ pelloc'h : a-dizh hag a-dag e treuzis al liorzh. Kement a vall a oa warnon, zoken, ma 'z is d'en em deurel e-mesk ar broenn ha ma santis eno va zreid o vont don er fank evel pa vefe bet un nerzh o sachañ warnon eus a-zindan an douar. « Oc'ho ! » emeve, « tapet e vefen bet gant an tasmant ? » Ul lamm a ris, damspondet, ha me dreist ar voger e-barzh ar c'hoad.

Aze e oa teñval ha d'am c'halon drist e plije kenañ an deñvalijenn : aze ne oa ket echu an noz, an nozvezh wenvidik n'oufen morse koll ar soñj anezhi... Ne zihunis da vat nemet pa voen e-kreiz ar parkeier : dirazon e fringe laouen ur bagad yourc'hed hag eus an oabl e tiskenne kan sklaer an alc'houedered. Met disoursi n'hellen ket bezañ ken, « Ha bremañ, Johannes, » a lavaren ouzhin va-unan, « petra 'vo graet ? Da vuiañ-karet a zo stag he buhez ouzh da hini ha te n'hellez ket mui bevañ pell diouti. Neuze, petra 'vo graet ? »

Gwellañ tra a oufe Katharina ober, a soñjen, a ve mont da vevañ er gouent gant he moereb. E-keit-se ez afen-me da c'houlenn skoazell gant va c'heneiled en Holland ha di e tegasfen va gwreg kerkent ha ma vefe prest an traoù d'he degemer. Gouzout a rafe marteze Katharina, zoken, gounit kalon he moereb. Forzh penaos, ret-mat e vije dezhi dimeziñ ganin bremañ. Ha dija dre va faltazi e welen ac'hanon va-

unan o vont gant va fried koant war tonnoù glas ar Zuidersee, va mignoned ouzh hon gortoz war ar chaoser hag ouzh hon ambroug betek hon ti bihan kaer. Birviñ a raen gant al levez. Ha seul vibinoc'h e valeen dre greiz ar geot gleb, evel p'am bije gallet tizhout an evurusted seul vuanoc'h a se.

Disheñvel e troas an traoù.

Souezhet a-walc'h e tiskouezas Hans Ottsen bezañ pa erruis en e davarn. « Arsa 'ta, mestr Johannes, petra 'zo bet dec'h amañ ganeoc'h hag ar Junkerien ? Amzer din mont da ziskargañ un nebeut banneoù d'an dañserien ha setu ma oa krog an daou Junker da sakreal ha da bec'hiñ war ho lerc'h, ken e oa ur spont, hag an daou gi da razailhat e-tal an nor evel loened posedet ! »

N'en doa an ostiz meizet tra en tabut ha diwall a ris mat a reiñ diskleriadurioù dezhañ.

« C'hwi 'oar mat, n'omp bet morse komperien, ar Von Der Risch ha me. Pa oamp bugale e veze dibaouez tabut etrezomp : dec'h ez eus bet un abadenn all, setu holl. »

« Ya, ya, » eme ar paotr kozh, « met ar Von Der Risch a zo bremañ mestr en e gastell, ha mat e rafec'h teurel evezh muioc'h, Aotrou Johannes. »

Ne respontis tra. Debrñ va merenn a ris ha mont er staol da gemer va c'hleze. va c'hreion hag un nebeut follennoù paper.

Amzer a oa da c'hortoz ac'han da greisteiz. Lavarout a reas Hans Ottsen e lakafe kas va marc'h betek ar maner ha neuze e kemeris-me penn va hent war-du ar saprenneg. Azezañ a ris e-touez ar brug, war un dorgennig a veze gwelet diwar he lein ar maner gant e liorzha ha girzhier an eostiged, ha gant kalz a garantez en em lakais da dresañ : rak ne felle ket din e kollfe Katharina, zoken en estrenvro, ar gwel eus ti he zad. Div eurvezh goude e oa echu ganin va skeudenn. Mont a ris neuze betek frankizenn an emgav hag, azezet dindan ur faouenn vras, e c'hortozis.

Kousket e vanis, ha ne zihunis nemet pa sonas ar c'hloc'h da vare lein. Kreñv e oa an heol, ha ken tomm e save war a zro frond ar flamboez ma trois da soñjal en amzer kozh-kozh ma teuen gant Katharina da frouesha er c'hoad. Ha trumm e kredis gwelout anezhi o vale dre greiz ar brousgwez, dezhi a-wechoù doare ar plac'hig vihan he flezhennoù gell, ha gwech all doare ar vaouez karantezus am boa bet etre va divrec'h hag a vefe tuchantik souchet adarre war poull va c'halon.

Hag a-greiz-holl e voen paket gant an enkrez. Ne oa ket deut, hag abaoe pell e oa sonet ar c'hloc'h ! Pelec'h 'ta e oa chomet ? Sevel a ris, mont du-mañ, du-hont da sellout, ha ne zeue ket Katharina. Trouz ebet ne gleven, nemet sarac'h ar gwent, uhel-uhel, e kern ar faou bras. Ne voen ket mui evit padout. A gammedoù hir ez is tramek ar vereuri... War ar vali ez erruis gant Dietrich.

« Aotrou Johannes, » a c'harmas spontet-holl kerkent ha ma welas ac'hanon, « bez' oc'h bet dec'h e tavarn Hans Ottsen, rak e baotrig 'zo o paouez degas ho marc'h en-dro. Petra hoc'h eus lavaret d'ar Junkerien ? »

« Ha perak ar seurt goulenn, Dietrich ? »

« Perak ? Peogwir ne fell ket din e c'hoarvezfe gwalleur ebet. »

« Penaos ? » a c'harmis, va mouezh o trankañ em c'horzailhenn. « Petra 'zo bet amañ ? »

« Gouzout a rit gwelloc'h egedon, Aotrou Johannes, » eme an den kozh. « Rak me n'em eus ket klevet kalz tra. Un eur 'zo, pa oan o vont el liorz da glask ar mevel bras, setu ma erruis gant tintin Ursul hag ar Junker. Dindan prenestr an dimezell Katharina e oant o-daou, an dintin o huchal hag o safariñ en ur ziskouez an iliavenn hag ar prenestr, hag ar Junker o selaou, stardet e javedoù ha du-spontus e lagad. Ne gomprenis ket mat peseurt kaoz a oa ganto. Pezh a zo sur, an dintin a oa ganti en he dorn un tamm mantell diroget-holl. »

« Ha neuze, Dietrich ? » a c'harmis, rak tavet e oa an den

kozh d'ober ur sellad ouzh ar vantell e pilhoù a zougen ouzh pleg va brec'h.

« Neuze e troas trumm ar Junker davedon da c'houllenn pelec'h e oac'h : rak c'hoant en doa komz ganeoc'h. Hag e-giz d'ur bleiz marnaoniet e oa e zaoulagad. »

« Er gêr emañ ar Junker ? » emeve.

« Er gêr ? Sur a-walc'h emañ. N'oc'h ket e soñj, avat... »

« Eo ! E soñj mont d'e gaout ez on, hag ez in. » Kregiñ em dorn a reas Dietrich.

« N'it ket, Johannes, hoc'h aspediñ a ran ! Kontit din da nebeutañ ar pezh a zo c'hoarvezet. Daoust ha n'eo ket kuzulioù mat a zo bet roet deoc'h atav gant ar paotr kozh a zo, ac'hanon ? »

« Tuchantik, tuchantik, » emeve o vont e-biou.

« Tuchantik, » a lavaras an den kozh, trist e vouezh. « Doue hepken a oar pelec'h e vimp tuchantik, an holl ac'hanomp. »

Ne selaouen ket mui. Mibin e saven gant diri ar maner. En e gambr e oa ar mestr, a lavaras din ar vatezh a erruis ganti en trepas. Ur vunutenn goude e skoen ouzh an nor.

Ar penn a oa goloet e vogerioù gant armoù a bep seurt hag er c'hreiz anezhañ e oa ar Junker en e sav, ur bistolenn gantañ en e zorn. Ken ferv e troas e zaoulagad davedon p'en em ziskouezis war an treuzoù ma voe darbet din kilañ. « A ! a ! » a c'harmas neuze, yud e vouezh, « sed an Aotrou Johannes ! Nemet e vije dija e dasmant ! »

« Kavout a rae deoc'h marteze na vefen ket deut d'ho kaout, Junker Wulf ? »

« Ya, kavout a rae din, Aotrou Johannes. Ken am boa kaset va zud war ho lerc'h, zoken. Met divinet ho poa va menoz. Na pegen fin oc'h. Aotrou Johannes ! E koulz mat oc'h deut ! »

Krenañ rae e vouezh gant ar fulor ha ken gouez e oa e zremm ma kasis va dorn d'am c'hleze.

« Ho pet ar vadelezh da selaou ar pezh am eus da lavarout, » emeve.

« Te an hini eo a selaouo, lampon, » a yudas rak n'eo ket mui komz a rae. « Pa 'z on bet dihunet er mintin-mañ em eus bet keuz, pe dost, da vezañ iset va chas a-enep dit. Bremañ n'am eus ken keuz nemet na vefes ket bet drailhet ganto : rak din e vo da echuiñ al labour ! »

Ur wech c'hoazh e klaskis komz.

« Junker Wulf, » emeve, « n'on ket nobl, gwir eo. Hogen n'on ket livour fall kennebeut, hag un deiz marteze e vin anavezet ha brudet. Doujus-bras ho pedan 'ta da reiñ din ho c'hoar da bried... »

Stanket e chomas ar gerioù em c'horzailhenn. E-kreiz an dremm dislivet gant ar gounnar, e oa daoulagad kriz ar poltred kozh o sellout ouzhin. Ur c'hoarzhadenn skiltr a glevis c'hoazh, un taol pistolenn, ha neuze stirlink va c'hleze pa gouezhen war daroù al leur.

\*

\* \*

Meur a sizhun a oa tremenet abaoe. Melen e oa deut ar gwez da vezañ pa c'hellis, evit ar wech kentañ, mont er-maez eus al lochenn a oan bet degaset enni goude ar gwallzarvoud hag azezañ e-tal an nor e klouarijenn an heol diskar-hañv. Skuizh e troen va daoulagad etrezek ar c'hoad bras a save ar maner en tu all dezhañ, o klask gwelout kambrig Katharina. Met re bell e oan, ha re wan ivez. E-pad hir amzer e oan chomet war ar gwele, den o tont war va zro nemet mestr al lochenn, e wreg hag ur mezeg dianav. Gour anezho n'en doa goulennet penaos e oan bet gloazet ha n'em boa lavaret tra. Sevel klemm dirak al lez-varn am bije gallet ober : met ouzh mab an Aotrou Gerhardus ha breur Katharina am bije ranket proseziñ. Ken na ris mann. En gortoz a se e oa ar Junker moarvat. Ha suroc'h c'hoazh ne oa ket chalet bras gant al lezennoù hag ar varnerien.

Ur wech hepken e oa deut Dietrich d'am c'haout : war

urzh ar Junker e tegase din, evel priz va labour, daou rollad skoedoù Hungaria. Kemeret am boa an arc'hant, o soñjal he defe Katharina ezhomm anezho goude ma vefemp dimezet. Met diskleriadurioù n'em boa ket gallet kaout. dre ma oa chomet atav mestr al lochenn da selaou ha da spiañ : klevet am boa hepken na oa ket aet ar Junker da foar Gouel-Yann ha na oa ket bet gwelet ken Katharina gant den ebet abaoe. Pedet am boa ar c'hoziad da lavarout d'an dimezell e soñjen enni, ez afen da Vro-Holland ar c'hentañ ar gwellañ, hag e tistrofen ken buan all ; ha prometet en doa Dietrich ober ar gefridi.

Ken poanuis e oa din chom hep ober netra ma n'oulis ket sentiñ pelloc'h ouzh ar medisin hag, a-enep d'e guzul, e kemeris penn va hent war-du an Holland. Salv ez erruis duhont, kaer e voen degemeret gant va mignoned, ha plijet-bras e klevis e oa bet gwerzhet ker a-walc'h div daolenn diwar va dorn bet lezet en aked va mestr Van Der Helst. Diouzhtu e voen goulennet gant ur bourc'hiz pinvidik eus an Hag da livañ skeudenn e verc'h a oa o paouez dimeziñ ha laouen-holl ez asantis : evel-se e c'hellfen kavout hep re zale an tiig koant am boa ezhomm evit Katharina.

Siwazh ne ra ket an den atav ar pezh a gar. Echu ganin va zaolenn ha gounezet brud hag arc'hant, setu na voen ket evit mont en-dro da Vro-Holsten. Re am boa labouret, hep kemer preder a-walc'h gant va c'horf dinerzhet, ken e kouezhis klañv dres pa groge ar varc'hadourien wastilli da sevel o zeltennoù evit foar vras an Nedeleg. Ha pell e rankis chom war va gwele : daoust pegen madelezhus e oa evidon va c'heneiled ha va mezeien dizeriañ ne raen ken o chom hep kaout keloù eus Katharina. Pa voe echu ar goañv ha pa lammas adarre tonnoù glas ar Zuidersee war an draezhenn e voen ambrouget gant va mignoned betek ar porzh Met e-lec'h goanag laouen, enkreuz a oa leun va c'halon.

Daoust da se e ris ur veaj vat hag a-nevez evel ar bloaz a-raok, e treuzis ar c'hoad a zifluke ennañ ar broñsoù kentañ.



Dreo e kane pintered ha rouzeganed. met petra 'verne din ?... N'is ket war-eeun da welout Dietrich kozh : o treiñ diwar an hent bras e tiskennis etrezek ar gêriadenn hag hepdale ez erruen gant Hans Ottsen en e davarn. Ur sell iskis a reas an ostiz ouzhin, ha lavarout em boa liv brav. « Diwallit, avat, a c'hoari ken gant armoù-tan. Dañjerusoc'h traoù int eget ho kreionoù ha barroù-livañ. »

Ne lavariz ket kontrol, anat. Goulenn a ris hepken kelou eus Dietrich. Marv e oa ar paotr kozh e derou ar goañv, en un taol trumm e-giz ma c'hoarvez alies gant an dud kofek. « Evurus eo bremañ, » eme Hans Ottsen, « peogwir emañ er baradoz gant e vestr. »

« Amen ! » emeve. « Doue d'az pardono, va Dietrich kozh karet ! »

Ne greden ket menegiñ anv Katharina, ha koulskoude n'em boa ken c'hoant nemet komz diwar he fenn. Enkrezet a-walc'h e c'houlennis 'ta : « Hag ar Von Der Risch, penaos emañ ar bed gantañ » ?

« Iche ! » a c'hoarzhaz an ostiz leizh e gof. « henezh en deus kemeret ur wreg a ray dezhañ bale moan. » Disammet e voe va c'halon rak n'helle ket ar wreg-se, anat, bezañ Katharina : aet e oa ar Junker da fortunañ gant un intañvez, kozh an tamm anezhi met gwenneien leun he c'houfrou.

Hag e ti an Aotrou Gerhardus, a c'houlennis, penaos ez ae an traoù ? Yac'h e oa ar Junker hag e c'hoar atav ?

Ur sell iskis a reas ar paotr ouzhin adarre.

« C'hwi 'gred deoc'h ez eo bouzar ha mut ar mogerioù ? » emezañ goapaus.

« Penaos ? » a c'harmis, poan o tennañ va anal. « Petra 'zo c'hoarvezet ? »

« Ale 'ta, Aotrou Johannes, » eme an tavarnour, rok un tamm e vouezh, « piv a oufe gwell egedoc'h pelec'h emañ an dimezell Katharina ? N'oc'h ket bet gwelet du-mañ e-doug an diskar-amzer, gwir eo, met ar souezhusañ-holl eo e kredfec'h

en em ziskouez amañ ur wech c'hoazh rak sur-mat n'eo ket bet plijet kalz ar Junker Wulf gant ar geusteuenn. »

Dispourbellañ va daoulagad a ris evel pa vefen aet sot. Ha trumm e komprenis.

« Labous fall ! » a youc'his. « Met n'on ket dimezet gant Katharina ! »

« Roit peoc'h din, » eme an den kozh, rak rust em boa tapet anezhañ dre e zivskoaz, « n'ouzon ket hag-eñ ez oc'h dimezet pe n'oc'h ket, ha ne vern din. Lavaret 'm eus pezh a vez kontet gant an holl, setu. Forzh penaos, abaoe kala-genver n'eo ket bet gwelet ken al liv eus an dimezell. »

Touiñ a ris dezhañ e oan bet en Holland e-doug an holl amzer-se, dalc'het war va gwele gant ar c'hleñved, ha na ouien tra eus ar pezh a oa tremenet er c'hastell. Daoust ha krediñ a reas ac'hanon, n'oufen touiñ, met digantañ e klevis ul lodenn eus an istor. Un abardaez e oa deut e kuzh ur pastor er maner. Kaset e oa bet an holl vevelien da gousket met savet e oa ur vatezh da sellout dre doull an nor : gwelet he doa an den-a-iliz, ha me ivez a lavare, o vont a-hed an trepas hag o tiskenn gant an dirioù. Klevet e oa bet neuze ur c'harr o loc'hañ kuit hag abaoe ne chome mui er c'hastell nemet ar Junker ha tintin Ursul.

Ne glaskin ket kontañ amañ kement a ris da gavout roudoù Katharina. Er gêriadenn ne oa tra da glevout nemet kozh koñchennoù seurt ar re a oa deut gant Hans Ottsen. Mont a ris 'ta da gaout c'hoar an Aotrou Gerhardus, hogen nac'h a reas degemer ac'hanon hag a-hend-all, a voe lavaret din, ne oa bet gwelet dimezell yaouank ebet er gouent. Lezet ganin va mezh, e kredis mont da skeiñ ouzh dor an Von Der Risch hag hemañ a c'hoarzhaz goap warnon ken na c'hellas : aet e oa al labous koant gant ar barged emezañ ha forzh penaos n'en doa mui darempred ebet gant tud ar maner.

Klevet gantañ e ti Hans Ottsen e oan deut en-dro, e fougeas ar Junker Wulf e kasfe e chas war va lerc'h ur wech c'hoazh, hag

evit mat. Ken ez is un noz da guzhat er c'hoad ha da c'hedal anezhañ evel ul lavagnon. Tennet e voe ar c'hontilli, ha dav d'an emgann : ar Junker Wulf a voe gouliet, met ne gomzas ket. Yen e sellas ouzhin gant e zaoulagad drouk ha mont kuit hep rannañ ur ger. Distreñ a ris neuze da Hambourg, e-lec'h ma vefe aesoc'h din, a soñjen, ober va enklaskoù.

Poan gollet ne voe ken. avat.

\*  
\* \* \*

E-giz-mañ ez echue ar c'haier kentañ... Goustad e savis va selloù war-du an daolenn gozh dirazon an den ken kaer ha ken sioul e zremm a oa an Aotrou Gerhardus. Met piv e oa ar bugel marv ?

Kemer a ris an eil kaier, ha lenn :

\*  
\* \* \*

### **Kerkoulz ha poultr pe vogedenn Sed penaos e tremen mab-den.**

Ar gerioù-mañ a oa engravet e maen-treustell un ti kozh nepell diouzh kêr : o lenn a raen bewech ma tremenen war an hent e-biou, ha pell amzer goude e tassone em penn an eñvor anezho. Pa voe diskaret an ti, un nebeut mizioù a zo, e prenis ar maen hag hel lakaat a ris enframman e-kreiz talbenn va lojeiz : eno emañ bremañ, a-us da doull va dor, ha salv ma c'hello an dud, o lenn ar pezh a zo skrivet warnañ, derc'hel soñj n'eus netra padus war hon tamm douar paour. Din-me, avat, e rank an div werzenn degas da goun dreist-holl ez on deut tost d'am eur diwezhañ hag ez eo poent din echuiñ va eñvorennoù. Ha te, va niz karet, mab va c'hoar nemeti, hag a yelo ganit kent pell va zammig peadra, a gavo ivez war va

lerc'h an nebeut follennoù-mañ : diwarno ez anavezi istor va foanioù, n'am eus morse kontet da zen ebet.

E 1666 e teuis er gêr-mañ evit ar wech kentañ. Goulennet e oan bet gant un intañvez pinvidik da liveañ ul « Lazar o sevel eus ar bez » (e koun eus he fried, marc'hadour-gwin diouzh e vicher, e voe profet an daolenn d'an iliz-parrez, e-lec'h ma c'heller gwelout anezhi c'hoazh a-us d'ar maen-badez) ha gant an Aotrou Titus Axen, bet Thurmherr en Hambourg, da ober e boltred. Evit un nebeut mizioù em boa labour dirazon eta ha bod a gavis e ti va breur nemetañ, sekretour kuzul kêr, hag a veve eno abaoe pell, hep tamm gwreg na bugale, en ti bras, gant an div wezenn-dilh dirazañ, a zo e korn ar marc'hallac'h. An ti-se a zo deut din goude marv va breur, hag ennañ e choman, kozh ha trist, o c'hortoz ar mare ma 'z in da gaout ar re garet a zo aet em raok da ved ar peoc'h.

Ar marc'h-koad ha va rikoù-liveañ am boa kaset da di an intañvez ha brav e vefen bet eno evit labourat, en trepas ledan a gouezhe puilh ar goulou ennañ eus al laez, ma ne vefen ket bet direnket ken alies gant an hini gozh. Dibaouez avat e teuehi da dreñ ha da zistreiñ war va zro, he chopinoù staen ganti en he dorn. Un deiz, zoken, setu ma aspedas ac'hanon da liveañ penn he gwaz war korf Lazar da gentañ n'am boa ket anavezet he fried ha d'an eil em boa klevet digant va breur e touge, evel kalz marc'hadourien-win, arouez flamm e vicher e-kreiz e fas, e stumm ur mell pikol fri ruz-glas : ken e rankis kas, krenn ha krak, an intañvez droch da sutal. Ha hi aet en-dro da gaout pichedoù ha pratikoù, e trois da soñjal en amzer ma oan o tresañ dremm varv un den all ha ma oa ur plac'h all em c'hichen, en ur chapel vihan. Hag e vanen kollet va spered en amzer gozh pa verzis trumm e oa penn an Aotrou Gerhardus, madelezh leun e zaoulagad, am boa livet war an daolenn. « Evel-se, » emeve a vouezh izel, « e welin anezhañ en-dro er beurbadelezh. »

Ne oan ket troet da labourat. Distreiñ a ris d'ar gêr hag,

em azez e toull ar prenestr, e chomis da sellout ouzh an dud deut niverus d'ar marc'had : cheorenned Ostenfeld gant o brozhioù ruz, merc'hed an inizi gant o c'hoefoù gwenn hag o bravigoù arc'hant, ar gouerien o heuzioù ler melen a rae un daolenn plijus-dreist da unan a oa bet e skol gant Hollandiz. Hogen morennet e oa va dremm gant an dristidigezh. N'eo ket morc'hed ken a oa em c'halon avat, met ur seurt glac'har dous ha kriz war un dro. Dirak an ti e oa laouen an dud en heol gor kreisteiz : em daoulagad, avat, e oa skleur al loar gann em divskouarn e tassone storlok ur prenestr o tigeriñ ha geiz an eostiged, hag eus don va c'halon e save davet an Aotrou e-giz ur bedenn : « Pelec'h eman-hi ? Pelec'h e vo-hi kavet » ?

A-greiz-holl e voen dihunet gant ur vouezh rust. Daou zen a oa dindan va frenestr : unan, ur pezh melj tra hir, a oa dezhañ dilhad ur pastor ha doare ur soudard gant e fas kleizennet-holl ; egile, bihanoc'h, a oa anat warnañ, daoust d'e loeroù gloan du ha da voukloù arc'hant e votoù, e oa diwar ar maez. O komz diwar va fenn e oant, rak meur a wech e klevis va anv o tont ganto. A-benn ur pennad ez eas kuit an hini bras a rampadennoù hir hag e teuas e geneil da seniñ ar c'hloc'hig e toull va dor.

Sakrist e oa, a zisplegas din an den, er barrez vihan en hanternoz da gêr hag ezhomm en doa eus ul livour d'ober skeudenn ar pastor. Goulenn a ris peseurt traoù souezhus a oa bet sevenet gantañ evit ma vefe graet dezhañ ker bras enor : tra ebet, eme ar sakrist, nemet en doa prosezet ur wech a-enep e amezeien evit un tachadig-douar ha setu holl. Graet e oa bet poltreoù an holl bastored a oa bet en e raog er barrez hag eñ, ar sakrist, a felle groñs dezhañ e vije skeudenn ar pastor nevez e-kichen ar re all en iliz. Ar pastor e-unan a rae foultre kaer.

Izel-izel e oa ar priz kinniget din. Ken e lavariz ouzhin va-unan, feuket an tamm ac'hanon : « Ar re-se a gred dezho, sur-mat, ez on bet o vont da heul an armeoù ha n'am eus graet morse tra nemet poltreoù soudarded evit ar merc'hed

yaouank ! » Hogen skuizh e oan aet gant va Lazar, ne oan ket kennebeut evit labourat war ar poltred all dre ma oa dalc'het an Aotrou Titus Axen war e wele gant ar c'hleñved hag ouzhpenn-se e plije kenañ din soñjal em befe da dreuziñ bemdeiz al lanneg vras e goulou dous heol an diskar-amzer : ken ez asantis, war an diviz e vefe graet al labour er gêriadenn.

Laouen e voe ar sakrist : ar pastor, emezañ, en doa lakaet dres an hevelep diviz. Er skol e rafen va labour hag evel-se n'en defe ar pastor nemet treuziñ Park ar C'hloareg d'ober evit dont d'am c'haout. Ar vugale a vefe kaset d'ar gêr : pezh na rae forzh, rak e-pad ar goañv hepken e vezent o labourat da vat. Graet e voe ar marc'had ha gantañ e kasas ar sakrist kement a oa ret evit fardañ an daolenn.

Diwezhat e tistroas va breur d'ar gêr : trouz a oa bet etre ar guzulierien diwar-benn relegoù ur bourev na felle da zen ebet kas d'ar vered. Kontañ ris ar pezh a oa tremenet ha diouzhtu ez erbedas din va breur kemer ganin liv du ha gell-ruz e-leizh : rak ur penn seurt na veze ket gwelet alies am befe da dresañ, emezañ. Chapalan en arme ar Brandebourg e oa bet ar pastor hag, hervez a veze kontet, gwashoc'h troioù en doa graet eget an ofiserien o-unan : bremañ avat e oa deut da vezañ fur ha rust e rene e gouerien war hent ar mad Gant noblañsoù a vro-Holsten e oa bet roet e garg dezhañ, met ne ouie va breur netra resis.

Antronoz-veure ez aen, mibin va bale, a-dreuz al lanneg. Kollet e oa gant ar brug, avat. o liv roz hag o frond balzamek. ha dizeil e oa ar gwez. Kloc'hdi ar gêriadenn, lemm war an oabl louet, a welen o sevel uheloc'h-uhelañ a-feur ma tostaen. Ouzh troad an iliz, etre an toennoù soul teñval, ne greske nemet bodoù teusk, ken kreñv e c'hwezhe eno an avel vor.

Evel un torad golveni e tiffipas ar vugale eus ar skol p'en em ziskouezis. « Sellit pegen laouen e lezont kaieroù ha levrioù, » a lavaras din ar sakrist a-ziwar treuzoù an nor. « War o api e oant, hag an holl da nijal kuit kerkent ha m'oc'h bet gwelet. »

Dont a reas ar pastor d'am c'haout. Bez' e oa an den brasse, garv e zremm, a oa bet an deiz a-raok o komz dindan va frenestr. Dre e zorn e kase gantañ ur paotrig koant, munut-munut, e-tro pevar bloaz dezhañ.

Goulenn a ris aotre da deurel ur sell war ar poltreoù kozh hag ambrouget e voen gant ar pastor betek an iliz. En ul lec'h ken uhel e oa honnezh ms veze gwelet a-zirak enni ar geunioù, al lannegi ha diouzh tu ar c'hornog, ar mor a zeu da lipat troad an tevenn. Lano a oa ha goloet e oa ar pladurioù gant an tonnoù glas-arc'hant. Astenn e zorn a reas an den war-du ar strizh-mor a ranne an enezenn diouzh an douar bras ha lavarout meurdezus : « Aze e oa ti va zud hag e 1634 e vo skarzhet kuit, evel kantadoù tiez all, gant ar reverzhi bras. Taolet er c'hostez on bet-me, met va zad ha va mamm ha va breur a zo aet d'ar bed all. » Ken e soñjis : « En ul lec'h brav eo bet savet an iliz peogwir e vez klevet amañ dalc'hmat mouezh vras Doue. » Hag ar paotrig koant, kluchet war brec'h ar pastor, a souche e jod ouzh jod kalet an den du, evel p'en defe klasket gwarez a-enep an diventelezh a 'n em lede dirazomp hag a sonne dezhañ e galon.

Mont a rejomp en iliz. Ne dalveze mann ebet ar poltreoù ha lavarout a raen ouzhin va-unan, re lorc'hus marteze an tamm ac'hanon, e vije diskibl Van Der Helst e kompagnunezh iskis, pa savas mouezh rust ar pastor. « Ne blij ket din gouzout e vo lakaet va skeudenn da badout goude ma vezo aet anal Doue diouzhin, » emezañ. « Ranket em eus plegañ da c'hoant va farrezioniz, setu. Met grit buan ho labour, mestr, rak talvoudusoc'h traoù am eus d'ober. » Hag e prometis d'an den, hoalus e zremm d'un arzour, e rafen eus va gwellañ.

Goulenn a ris neuze keloù eus ur Werc'hez koat hag a oa bet lavaret din gant va breur pegen kaer e oa.

« An delwenn gozh ? » emezañ, ur mousc'hoarzhig leun a fae war e vuzell. « Re ziwezhat oc'h deut. Lakaet em eus kas anezhi e-maez an iliz, ha kollet eo bet abaoe ! »

« Penaos, » a c'harmis spontet, « ne felle ket deoc'h kaout mamm Doue en hoc'h iliz ? »

« Den ne oar penaos e oa he dremm. »

« Daoust hag-eñ n'hell ket an arz klask he c'hrouiñ endro ? »

Goustad e lezas e sell teñval da ziskenn warnon. « Daoust hag-eñ n'en deus ket ar Roue degaset papisted a Vro-Holland da sevel du-hont chaoserioù ouzh ar mor, evel pa ne vije ket follentez stourm a-enep da youl Doue ? Daoust hag-eñ n'eus ket bet lakaet nevez 'zo daou sant koat e chantele an iliz vras e kêr ? Pedit ha beilhit ! Rak e pep lec'h emañ Satanaz o kantren. An delwennoù n'int mat nemet da vagañ gwallc'hoantoù ha papistelezh ! A-viskoazh en deus an arz orgedet gant ar bed ! » Kounnaret e oa e zaoulagad hogen tener e pade da flourañ pennad-blev ar bugelig.

Ne voen ket evit respont : gwell e kavis distreiñ diouzhtu d'ar skol.

Pep mintin ez aen d'ar gêriadenn, e-lec'h ma kaven atav ar pastor ouzh va gortoz. Gwall nemeur e komzemp, ha seul vuanoc'h a se ez ae al labour war-raok. Peurliesañ e veze ar sakrist ganeomp : kas a rae e amzer o fardañ, hervez giz ar vro, boestoù koad kizellet ha digantañ em boe ar c'houfrig a zo ennañ follennoù kentañ va dornskrid. Morse ne voen pedet gant ar pastor da vont en e di. Hogen bemdeiz e teue ar paotrig d'ar sal-skol ha digomz e chome en ur c'horn da c'hoari meinigoù. Ur wech e c'houlennis outañ pe anv e oa. « Johannes, » emezañ. « Johannes ? Me ivez a zo Johannes. » Souezhet e sellas ouzhin ha ne lavaras mui netra.

Ken fromet e vezen gant e zaoulagad, hag ivez gant e zremm dristidik, ma c'hoarveze din alies disoñjal va labour ha pep tra all war va zro evit sellout outañ : karet em befe neuze kemer ar paotrig etre va divrec'h, met aon am boa rak an den rust a seblante diwall anezhañ e-giz ma tiwaller un teñzor. Sur, a soñjen, n'eo ket el levenez eo bet ganet ar bugel-mañ.



Ha neuze e teue diouzhtu ar menoz war va spered : « peseurt mamm a c'hell 'ta kaout » ?

Ur wech am boa goulennet keloù diwar he fenn gant matezh ar sakrist. Berr e oa bet ar respont. « Morse ne weler anezhi. Ne da ket zoken d'ar bikoioù pa 'z eus eured pe vadiziant. » Ar pastor e-unan ne ranne morse grik a-zivout e wreg. Ur wech em boa gwelet anezhi o vont a-dreuz Park ar C'hloareg : he c'hein a oa troet ouzhin, avat, ha n'am boa merzet ken nemet he neuz-korf mistr ha yaouank hag he blev rodellet-kaer o nijal gant an avel. Ken am boa lavaret ouzhin va-unan : honnezh hag ar pastor ne seblantont ket bezañ graet tre an eil evit egile.

An devezhioù ma chomen e kêr e raen war-dro va Lazar, ha kent pell e voe echu an div daolenn.

Un noz e oan er gêr gant va breur er sal vras. War an daol sko ouzh ar fornigell e oa marv ar c'houlouenn, rak abaoe pell e oa sonet kreiznoz. Hogen ne daolemp ket evezh ouzh an eur, hag e-tal ar prenestr e chomemp da gomz eus an amzer eürus, met ken berr, ma oamp holl o vevañ a-gevret gant hor c'hoar, marvet yaouank-flamm diwar wilioudiñ, gant hon tad hag hor mamm galvet re abred dirak an Aotrou. Ne oa ket bet serret ar stalafioù, ken frealzus e oa deomp sevel hon daoulagad etrezek an oabl e sked peurbadel.

Tevel a rejomp, ha war-du enni, war-du ar vuiañ-karet e tistroas va soñjoù. Ha trumm e tarzhas ar menoz em spered : « Daoulagad ar paotrig, met he daoulagad dezhi e oa ! Penaos e oan chomet ken pell hep o anavezout ?... Met neuze, hi an hini oa em boa gwelet el liorz ? » Hag e kinnigis semplañ diwar va spont.

D'an ampoent e skoas va breur un taolig war va skoaz. « Sell 'ta, » emezañ, o tiskouez din sked an etivi war ar marc'hallac'h, « mat hon eus graet o lakaat strewiñ plouz dirak hon ti. Ar re-mañ a zo bet en eured an teuzer-kleier ha n'eo ket diwar zour emaint rak un tammig re ez eo hejet ha dihejet o gouleier ganto. »

Gwir e lavare va breur. Koroll an etivi en deñvalijenn a ziskoueze pegen mat e oa bet ar friko. Hag ouzhpenn-se e oa safar gant ar baotred leizh o genou : « Sur eo bet-hi lazhet gant he mestr an diaoul, » a huche unan a bouez e benn. « Kofad c'hoarzhin am bije graet, koulskoude, o klevout ur wir sorserez o yudal en tan ! » Soñj a zeuas din neuze eus an traoù euzhus a oa o c'hoarvezout e kêr : penaos e oa bet barnet ur plac'h yaouank da vervel dre an tan dre ma oa sorserez ha penaos e oa he c'horf, kavet divuhez en toullbac'h er mintin-mañ end-eeun, da vezañ devet antronoz. Ha chalet-bras e oa an holl gant ur marv ken prim : pa oan bet da breñañ va c'hazetenn e ti an Itron Liebernickel em boa kavet ar varc'hadourez-levrioù o leñvañ truezus dre ma oa kollet evel-se ar werz he doa lakaet sevel ha moulañ e-sigur un darvoud ken bras. Gouzout a ouien-me avat petra soñjal war an troioù sorserezh ha trugarez a lavaren da Zoue, eus don va c'halon, evit bezañ degaset ar peoc'h d'ar baourgaezhezic. Va breur, leun a druez evel ma oa, a glemme kalz : rak dezhañ e vije da lenn ar varnedigezh dirak ar c'horf marv ha da evezhiañ ma vije devet mat ar relegoù. « Klevout a ran dija ar youc'hadeg a savo pa erruo ar c'harr war ar blasenn. Rak evel just e vo serret ar skolioù ha kement kañfard a zo e kêr a zeredo da welout Ma vefen ez plas ez afen d'ar gêriadenn da labourat sioul. »

Da lavarout ar wirionez, ne oan da vont du-hont nemet a-benn daou zevezh. Met va breur, dianav dezhañ an tan a zeve va c'halon, a bouezas kemeni warnon ken na voen ket evit enebiñ pelloc'h. Hag evel dre nerzh an tonkadur ez erruas kement emañ o vont da gontañ.

A-raok an heol e savis an deiz war-lerc'h. Trouz a oa dija war ar marc'hallac'h, gant ar boberien o tigeriñ o stalioù, an archerien o vale pounner dirak an ti-kêr, ar vicherourien o stigmañ pallennoù du war an dirioù bras, ha pelloc'h, e-kichen al Lehmühle, gant ar bourev hag ar vevelien o sevel ar bern

keuneud hag ar c'hentañ mousedigoù o tec'haloupat a-dreuz parkeier. Aour e oa livet an oabl, ken fromus ha ken tener ma juntis va daouarn en ijr bedenn virvidik :

O Salver, Aotrou ha Krist,  
 Ouzhomp-ni ho pet truez.  
 Er pec'hed omp kouezhet trist  
 Met c'hwi 'zo ar garantez.

War an hent bras, dre greiz al lanneg, e terede ar gouerien a vandennadoù, o bugale vihan ganto zoken.

« Da belec'h 'ta 'maoc'h o vont ? » a c'houlennis. « N'eus ket foar hiziv ! »

Gouzout a ouien mat perak e oant o vont e kêr : da glevout ar Sorserez, merc'h Satanaz, o youc'hal 'kreiz an tantad. « Hogen marv eo, ar Sorserez ! » « Dipitus eo, sur, » a voe respontet din, « met honnezh a oa nizez da voereb Siebzig, hon amiegez, ha ret-mat eo deomp mont da welout. Gant pezh a chom diouti 'vo graet ar gouel ! »

A vagadoù stankoc'h-stankañ e tiskenne an dud war-du kêr : kirri leun-chouk, zoken, a dremene bremañ e latar ar mintin ha me, c'hoant ennon bezañ va-unan-penn, ez is gant ur wenodennig distro da gantreal el lanneier. Pa erruis ouzh troad Krugelf ar Ramzed, e trois da soñjal e vije gwelloc'h mont da heul ar gouerien, pe neuze treiñ da gleiz etrezek ar mor ; hogen ennon e oa diwanet ur goanag a rae din skrijañ betek mel va eskern : « Moarvat e oa Hi am boa gwelet e Park ar C'hloareg. Ha ma c'hellfen hiziv... » Santout a raen va c'halon o talmiñ foll em c'hreizon ha spontet ez is d'en em goll e kornioù pellañ al lanneg : ne felle ket din gouzout ha-geñ e oa ar Pastor ivez o vont da welout an tantad. A-barzh an diwezh avat ez erruis er gêriadenn.

Serret e oa ti ar sakrist. Ur pennad e chomis dirak an nor hep gouzout petra ober, ha neuze e skois da daolioù meilh-dorn. En em ziskouez a reas Trienke, ar vatezh kozh, e toull ar prenestr e-kichen. « Hag ar sakrist, pelec'h emañ ? » a c'houlennis. « Ar

sakrist ? Aet eo da gêr gant ar pastor. » Selloù trelatet a ris ouzh an hini gozh, evel pa vefen bet skoet gant ar gurun.

« Ha klañv en em gavfec’h, aotrou livour ? »

Un hej a ris d’am penn, ha lavarout hepken :

« N’eus ket skol hiziv enta ? »

« Skol ! Pa vo lakaet ar sorserez en tan ! »

Reiñ digor din a reas an hini gozh. Mont a ris da gemer va zraoù e kamb ar sakrist hag en em lakaat da labourat er sal vras. Met n’eo ket gant al labour e oa va spered.

En em douellañ va-unan ne glasken ken : gouzout a ouien mat na oa ket evit livañ e oan deut amañ.

Dont a reas an hini gozh d’am c’haout, ha hi da zibunañ diwar-benn tud ar barrez ur bern koñchoù na veizen grik enno. Karet em befê lakaat un nebeut goulennoù a-zivout gwreg ar pastor – yaouank pe gozh e oa ? hag a belec’h e oa deut ? – met ne oan ket evit komz. Hag e-keit-se e pade Trienke gant he sotonioù : ar sorserez a oa kerent dezhi er barrez, moereb Siebzig da skouer, hag honnezh a wele sinadoù e-pad an noz ; n’eus ket pell, da skouer, he doa gwelet tri fallenn-kañv o nijal dreist da di ar pastor. Sur e oa an dra-se diougan ur gwallzarvoud bennak ; ha gwreg ar pastor, keta, daoust d’hec’h ardoù ha d’he lorc’hentez, ne oa nemet ur plac’h klañv ha drouklivet.

Ne voen ket evit selaou pelloc’h seurt drocherezh : kuitaat a ris ar skol ha diskenn gant ar ru vras e-biou da di ar pastor. Ankeniet e troen va selloù war-du ar prenester bihan, met a-dreñv ar stignoù gwenn ne dizhis gwelout tra nemet un nebeut podoù-bleuñv seurt a gaver e pep lec’h. Gallet em bize neuze dont en-dro war va c’hiz, met padout a ris gant va hent. Pa erruis e-tal ar vered e klevis, o tont eus kêr evel ur galv, son ar c’hloc’h-kañv : treiñ va fenn a ris, avat, ha sellout war-du ar c’hornog-e-lec’h ma skede ar mor, en dremmwel, e-giz arc’hant : ha koulskoude, en ur ober un nozvezh, e oa bet distrujet duhont miliadoù buhezioù gant dorn an Hollc’halloudeg. Da be

vad 'ta en em zifretañ evel ur vuzhugenn baour ?... Den ne oar da belec'h e vezo kaset gant galloud an Aotrou.

Ne vefen ket evit lavarout dre beseurt gwenodennoù e tremenis : treiñ ha distreiñ en-dro d'ar gêriadenn ne ris ken, avat, hag a-raok kreisteiz en em gaven adarre dirak ti ar sakrist. Hogen n'eo ket azezañ e-tal va zaolenn eo a ris : met treuziñ an ti ha mont er-maez dre an nor a-dreñv.

Biken n'ankounac'hain al liorzhibig baour e-giz m'o deus daoulagad he gwelet en deiz-se. Evel hini ar pastor e oa sko ouzh Park ar C'hloareg ha ne save tamm kleuz ebet etrezo : e-kreiz ar park, hepken, e kreske ur bodad haleg, tro-dro d'ul lenn sur-mat rak un deiz em boa gwelet ur vatezh o vont eno davit dour.

Ha keit ha ma tiskennen, goullo va spered ha strafuilhet va c'halon, tramek ar park bras, e kleven mouezh ur plac'h o lavarout d'ur bugel gerioù karantezus-kenañ. War-du enni ez is, re spontet evit soñjal, ha harpañ e-tal ar guchennad skav a zo e penn tachad-douar ar sakrist : pelloc'hik e welen Johannes bihan, gantañ ur vriad eus ar seurt kinvi a gresk e-touesk ar geot teusk, o vont mibin etrezek an haleg, e-lec'h m'en doa fardet, moarvat, diwar-bouez man ha brankoù munut, ul liorzhibig seurt a blij d'ar vugale ober. Hag adarre e klevis ar vouezh flour : « Kae da c'hoari. Bremañ 'c'h eus leun da zivrec'h ! Keit-se ez in da zastum hini bravoc'h c'hoazh, du-hont, ouzh troad ar skavenn. »

Ha hi – abaoe pell e ouien e oa hi – a zeuas goustad davedon, stouet he daoulagad, ken e c'hellen sellout outi va gwalc'h : hag hañvalout a reas din e oa deut en-dro da vezañ ar plac'hig a wechall a c'hoarie a-dreñv ar vereuri hag am boa lazhet eviti ar barged drouk. He dremm, avat, a oa hiziv dislivet-holl ha trist-marv.

Deut e oa tost-tost, hep gouzout dezhi, hag e-lec'h ma kreske fonnus ar man e taoulinas. N'eo ket dastum kinvi a reas, avat : soublañ he fenn, ya, ha lenvañ didrouz.

Ha me neuze, izel : « Katharina ! »

Sevel a reas he daoulagad. Tapout a ris he dorn ha dinerzh e teuas ganin e-kreiz ar bodad skav. He c'havet em boa, ha dirazi edon-me, ha n'he doe tra da lavarout nemet : « Petra 'vo graet, Johannes ! 'Vel-se 'mañ an traoù. Gouzout a ouien mat e oa te a oa al livour estren. Ne greden ket e vijes deut hiziv, setu holl. »

« Katharina ! » a c'harmis. « Katharina ! Te 'zo gwreg ar pastor ? »

Ne respontas ket. Sellout a reas ouzhin, spouronus ar glac'har en he daoulagad. « Evel-se en deus bet-eñ e garg, ha da vugel un anv enorus. »

« Va bugel, Katharina ? »

« N'ouzout ket c'hoazh ? Koulskoude eo aet war da varlenn ; ur wech da nebeutañ, lavaret en deus din. »

Gwashoc'h merzherinti n'hellfe bezañ anavezet gant kalon den.

« Ha te, ha va bugel, a vefe kollet evidon ? »

Sellout a reas ouzhin. Ne leñve ket. Gwenn e oa evel pa vije bet darev da vervel.

« Nann, ne chomo ket an traoù evel-se ! » a c'harmis. « Me a zeuio... » Ha foll e tirolle ar menozioù.

He dornig, fresk evel un delienn vae, he doa lakaet war va zal hag aspedus e oa savet war-du ennon an daoulagad du e-kreiz ar fas disliv. « N'eo ket te, Johannes, a raio din bezañ gwalleurusoc'h c'hoazh ? »

« Bevañ evel-se a c'hellez ober, Katharina ? »

« Bevañ !... Ul levenez n'am eus ken : karout a ra-eñ ar bugel. Petra 'c'hellfen goulenn muioc'h ? » « Ha diwar hor penn-ni, diwar ar pezh a zo bet gwechall etrezomp, daoust hag-eñ e oar ? »

« Nann ! Nann ! Ne oar tra ! » a c'harmas taer. « Kemeret en deus ar bec'herez da wreg : netra muioc'h. Va Doue, daoust ha n'eo ket a-walc'h e vije bremañ dezhañ kement devezh a dremen ? »

D'ar poent-se e teuas betek ennomp ur ganaouennig flour.  
« Ar bugel, » emezi. « Ret din mont da gaout ar bugel. Droug  
a c'hellfe c'hoarvezout gantañ. »

Met ne soñjen-me nemet er plac'h em boa c'hoant dezhi.  
« Chom 'ta, » emezon ; « emañ o c'hoari fur du-hont gant e  
vriad kinvi. »

Aet e oa Katharina war lezenn ar bodad skav da selaou.  
Tomm e skede heol an diskar-hañv met eus ar mor e save ur  
gleienn sin. Mouezhig flour hor bugel, loavus, a gane :

Daou aelig am flouriko,  
Daou aelig am cheriso,  
Daou aelig koant am c'haso  
Betek dor ar Baradoz.

Ur c'hammed en a-dreñv he doa graet Katharina. Sellout  
a rae ouzhin gant daoulagad dispourbellet ha trelatet. « Ha  
bremañ kenavo, Johannes, » a lavaras izel. « Kenavo ar bed all ! »

Karet em bije he c'hemer hag aspedus ec'h astennis daveti  
va divrec'h. Nac'h a reas, avat, en un hiboud. « Me 'zo gwreg  
d'egile, arabat disoñjal ! »

Ur barrad kounnar ruz a savas ennon. « Ha gwreg da biv  
out bet a-raok, Katharina ? » a c'harmis rust.

Leñvañ a reas ar plac'h en ur guzhat he dremm. « Siwazh, »  
a glemmas, « va c'horf paour, va c'horf paour gwallet ! »

Ne voen ket evit derc'hel pelloc'h warnon. Gouez e sachis  
anezhi ouzh va bruched, hag he stardañ evel ur foll. En  
diwezh e oa adarre etre va divrec'h, en diwezh ! Hag he sellou  
a ziskenne don em daoulagad, hag he muzelloù ruz a oa war va  
muzelloù. En em stardañ a raemp an eil ouzh egile. Evel-se hor  
bije karet mervel : c'hoant am boa he lazhañ. Ha hi lavarout,  
mouget pe dost gant va fokoù : « Ar vuhez a zo hir ha kalet  
anezhi ! O, Jezuz Krist, pardonit din ar pezh a ran. »

Ur respont a zeuas : mouezh rust an den all ouzh he gervel.  
Un eil gwech ha rustoc'h c'hoazh e teuas an hopadenn eus don  
al liorzhibig : « Katharina » !

Echu e oa an eurusted. Dic'hoanag leun he daoulagad e sellas Katharina ouzhin ha neuze, ken didrouz hag un tasmant, ez eas kuit...

... Er skol en em gavis gant ar sakrist, a oa o paouez distreiñ eus kêr, ha diouzhtu e stagas an den da gontañ doare ar sorserez. « N'oc'h ket chalet bras gant an dra, » emezañ. « pe ne vefec'h ket deut hiziv da labourat p'en deus an aotrou Pastor kaset holl dud ar barrez, zoken ar merc'hed, da welout. »

N'am boe ket amzer da respont. Tarzhet e oa ur vouc'hadenn spontus, hag a zassono va buhez-pad em divskouarn.

« Petra 'zo ? » a c'harmis.

Buan e tigoras an den ar prenestr, met sioul e oa bremañ pep tra. « Doue benniget, » emezañ, « ur vaouez an hini eo he deus youc'het, hag eus Park ar C'hloareg e teue ar son. »

D'ar poent-se e teredas Trienke gozh war an treuzoù. « Neuze, Aotrou, kouezhet eo ar pallennoù-kañv war ti ar pastor. »

« Penaos, Trienke ? »

« Penaos ? C'hoarvezet eo an traoù : mab ar pastor a zo bet beuzet el lenn. »

Lammat a ris e-maez ar gambr hag, a-dreuz liorzha ar sakrist, e redis betek Park ar C'hloareg. Dindan an haleg avat ne gavis tra nemet lec'hid ha gloan-dour war ar geot. Ne chomis ket pelloc'h da soñjal : digeriñ a ris an norig wenn ha mont e liorzha ar pastor ; erru e oan e toull an trepas p'en em ziskouezas an den dirazon.

Distronket-holl e oa e zremm hir treut, hag a-fuilh e kouezhe e vlev dirak e zaoulagad ruz gant an daeroù. « Petra 'fell deoc'h kaout ? » a c'houlennas.

Sellout a ris outañ hep rannañ grik. Ya, petra felle din kaout ?

« Hoc'h anaout a ran, » emezañ c'hoazh. « Ar wreg he deus anzavet pep tra a-benn an diwezh. »

N'em boa mui abeg ebet da chom serret va genou. « Pelec'h emañ va bugel ? » a c'houlennis.



« Lezet eo bet da veuziñ gant e dad hag e vamm. »

« Mont a rin da welout e gorf. »

Hag e vennis tremen pelloc'h. Eñ avat a sparlas an hent ouzhin. « Ar wreg a zo e-tal ar c'horf marv, » emezañ. « Laoskit ar bec'herez da bediñ e peoc'h. Evit silvidigezh hec'h ene, n'hoc'h eus ket ar gwir da vont. »

N'ouzon ket mui petra 'respontis. E gomzoù-eñ, avat, a chomo merket da viken em eñvor. « Selaouit ! Kasoni am eus ouzhoc'h, ha Doue ra deurvezo dezhañ ober din gouzañv un deiz evit se, ha kasoni hoc'h eus ouzhin, c'hwi ivez. Koulskoude, un dra 'zo a garomp hon-daou... Kit en-dro d'ar gêr, lakait kas betek amañ peadra d'ober un daolenn, ha deuit warc'hoazh da liveañ dremm ar bugel. Ne vo ket ar skeudenn evidon, nag evidoc'h, met evit iliz ar barrez-mañ, e-lec'h m'en deus tremenet e vuhez verr ha glan. Ha bezet soñj pep hini ouzh he gwelout na vez an dud nemet poultr dirak dorn treut-eskern an Ankou ! »

Souezhet e sellis ouzh an den-se, a lavare, ne oa ket pell, na oa an arz nemet ur c'hast a gemer plijadur gant ar bed. Met didermal e touis ober hervez e c'hoant.

Pa erruis er gêr e oa va breur dija en e wele, klañv diwar an traoù euzhus en doa gwelet. Sevel a reas war e ilin pa zeuis d'e gaout. « Ret e vo dit chom ur pennadig c'hoazh da ziskuizhañ, » emezañ. « Sell 'ta vat petra m'eus lennet, » a lavaras ouzhpenn, o tiskouez din ar gazetenn ; « den ne oar gant piv ez aio bremañ kastell an Aotrou Gerhardus, rak marv eo ar Junker Wulf diwar dantadur ur c'hi klañv hep lezel na gwreg na bugale war e lerc'h. »

Darbet e voe din semplañ pa glevis ar c'heloù. Digor e oa dirazon dorioù ar Baradoz, hogen war an treuzoù e save an Ael e gleze tan hag eus dort va c'halon e teue adarre ur garm : « O Aotrou, Aotrou, ken pell e oa ho mouezh ! » Ar marv-se en dije gallet reiñ deomp ar vuhez ; bremañ ne oa ken 'met un darvoud spontus ouzhpenn an holl zarvoudoù spontus all.

Em c'hambr e oan. An deñvalijenn a ziskennas warnon, an noz-du a giozas warnon, hag en oabl e flammine ar stered peurbadel. A-benn an diwezh ez is d'am gwele, hogen ne zeuas ket ar c'housesked. Din e oa evel pa vije bet kloc'hdi ar marc'hallac'h sko ouzh va frenestr hag a-hed an noz e kontis, un hag un, taolioù morzhol an horolaj bras. Tarzhañ reas kentañ skleurioù an deiz : a-us d'am fenn e oa treustoù ar sel evel tasmantoù hir. Sevel a ris, hag a-raok ma n'en dije an alc'houeder kentañ kemeret e nij dreist ar soulegi, e oan pell diouzh kêr.

Kaer am boa bezañ abred, ouzh va gortoz e toull dor e di e oa ar pastor. Da benn al laez ez is d'e heul tra ma tisplege din e oa erru-mat va zraoù hag en doa lakaet degas ar marc'h-koad hag al livioù eus skol ar sakrist. Neuze e tigoras un nor.

« Mar deo er gambr-mañ emañ ar c'horf, » emezon neuze, « ho pet ar vadelezh d'am lezel va-un. »

« Ne zeuio den d'ho tirenkañ, » a respontas. « Ma hoc'h eus naon, e kavot aze boued a-walc'h da zebriñ. » Diskouez a reas din ur penn en tu all d'an trepas, ha neuze ez eas kuit.

Ne gredis ket mont tre diouzhtu. Bras e oa ar sal ha gwennrazet he mogerioù : eno e veze graet ar c'hatekiz, surmat. Dre ar prenester e weled an aod en diabell. E-kreiz, war ur varskaoñ wenn, e oa ar bugel, klos e zaoulagad, e zent munut o skediñ vel perlez etre ar muzelloù disliv.

Kouezhañ ris war va daoulin dirak korf marv va mab ha pediñ a-greiz va c'halon. Neuze e renkis va zraoù evit al labour hag e krogis da livañ. Bep an amzer, er sioulded vras, e c'hoarveze din skrijañ gant ar spont, evel p'am bije klevet unan bennak o fiñval : hogen pa lakaen va evezh da selaou, ne oa mui trouz ebet. Ur wech, zoken, e klevis evel un anal-dianal : met pa soublis va muzelloù war va bugel, ne santis tra nemet yender ar marv. Un nor all a oa er sal, un nor a zigore moarvat war ur gambr-gousket : hag ac'hano e oa deut an trouz ? Kentoc'h e oa da grediñ e oan bet touellet gant va divskouarn.

Azezañ a ris adarre dirak va zaolenn. P'edon o tresañ an daouarn bihan goullou e lavariz ouzhin va-unan : « Ret-mat eo din ober ur profig d'am bugel ! » Hag e livis ul lugustrenn wenn en e vizied astennet war al liñsel, ken e vije bet soñjet e oa manet kousket a-greiz c'hoari : ur prof kaer e oa, rak dibaot a-walc'h e vez ar seurt bleunioù er vro.

A-benn an diwezh e pistigas an naon ac'hanon kement ma rankis sevel a-zirak va labour. Lezel a ris 'ta va barrig-livañ ha mont er gambr a oa bet diskouezet din gant ar pastor. Sabatuet e vanis war an treuzoù, avat : aze dirazon e oa Katharina, en he dilhad-kañv, gwir eo, met skedus he dremm gant an eurvad hag ar garantez. Siwazh ! He skeuderm ne oa ken, ar skeudenn am boa livet gwechall er c'hastell : hi ivez, zoken, a oa bet stlapet er-maez... Met Katharina, pelec'h e oa bremañ ? Daoust ha sparlet e oa en ur gambr ? Daoust ha kaset e oa bet d'un ti all ?... Pell-pell e chomis da sellout ouzh an daolenn : ennon e tihune eñvor an amzer-gozh, ur verzherinti d'am c'halon... Dre ret e lonkis un tamm bara hag un nebeut gwerennadoù gwin, hag ez is en-dro e-tal ar varskañ.

Merzout a ris neuze e oa savet un disterig malvennoù ar bugel. Stouiñ a ris warnañ, c'hoant din anavezout ur wech c'hoazh selloù va mab. Siwazh, yen e oa e zaoulagad, ken yen ma rejont din skrijañ pa greden lenn enno kasoni euzhus ar vamm-gozh drouk o c'hoarzhin goap : « Mallozh et oc'h bet, ho-taou. ha paet hoc'h eus ! » Tapout a ris – netra n'en dije gallet mirout ouzhin – ar c'horfig reut etre va divrec'h ha, daerou c'hwerv o tiruilhal gant va divjod, e stardis ouzh va bruched ar bugel muiañ-karet. « Nann, nann, va faotrig, n'eo ket da ene a welen ez taoulagad, met sell kriz an Ankou. Ha n'eo ket an tremened en deus lazhet ac'hanout, met da dad e-unan : fazi da dad an hini eo en deus sachet ar gwallleur warnomp-holl. »

Karantezus-bras e lakais en-dro va bugel war ar varskañ hag e klozis dezhañ e valvennoù. Neuze, gant liv ruz mouk,

e skrivis e traoñ an daolenn al lizherennoù C. P. A. S., evit lavarout **Culpa Patris Aquis Submersus**, « beuzet dre fazi e dad ». Hag ar c'homzoù kriz o tasseniñ em skouarn e peurechuis ar skeudenn.

Didrouz-marv e oa an ti abaoe pell. Ur wech bennak. avat, em boa klevet a-dreñv an nor all dilhad o sarac'hat... Daoust ha deut e oa Katharina eno, da vezañ em c'hichen e-keit ha ma raen va labour trist ?... Ne ouien ket petra soñjal.

Diwezhat e oa dija. Echu an daolenn, poent e oa din mont kuit. Koulskoude ur c'henavo am boa da lavarout c'hoazh. Chom a raen 'ta en entremar. o sellout dre ar prenestr ouzh ar parkeier a ziskenne warno teñvalijenn an noz, pa zeuas ar pastor d'am c'haout.

Va saludiñ a reas hep distagañ ur ger. Ha hir e studias dremm ar bugel, ha va skeudenn goude-se, o keñveriañ an eil ouzh eben. Pa verzas al lugustrenn em boa lakaet e dorn ar paotrig kaezh, ne voe ket evit derc'hel pelloc'h war e c'hlac'har ha puilh e flistras an dour en e zaoulagad.

Neuze ec'h astennis va divrec'h war-du ar c'horfig en ur c'harmiñ : « Johannes, va mab ! Kenavo, kenavo ar bed all ! »

Er gambr e-kichen e klevis unan bennak o teredek : daouarn munut a glaske digeriñ an nor ; ur vouezh a lavare va anv... pe anv ar bugel, n'ouzon ket ; ha neuze un trouz souezhus, evel pa vije bet ur vaouez o kouezhañ eus he sav.

« Katharina ! » a c'harmis. Ul lamm am boa graet, ha hejañ-dihejañ an nor sparlet a raen pa lakaas ar pastor e zorn war va brec'h. « Va labour din eo an dra-se ! » emezañ. « Kit kuit ! Hogen kit e peoc'h ! Ha Doue r'en devo truez ouzhomp holl ! »

Hag ez on aet kuit. Hep soñjal e treuzen al lanneg, o vont war-du kêr.

Ur wech c'hoazh e ris un ehan da deurel ur sell diwezhañ war ar gêriadenn damguzhet gant an noz. Ahont e oa korf va mab... ahont e oa Katharina... pep tra, pep tra ! Ar gouli am boa tapet gwechall a zeve din bremañ em bruched. Ha, tra

souezhus n'am boa biskoazh a-raok merzet eno, betek ennon e teue kroez ar mor. War va hent ne gavis den, ne glevis tra, nemet ar c'hroz-se a save dibaouez eus an aod, o luskell va glac'har : **Aquis Submersus ! Aquis Submersus !**

\*  
\* \*

Echu e oa an dornskrid.

Ar goanagoù a oa bet e kalon an Aotrou Johannes pa gave dezhañ, e barr e nerzh. e teufe un deiz da vezañ ken brudet hag ar re vrudetañ, kement-se a oa bet huñvre goullo, komzoù nijet gant an avel.

Ne vez ket klevet ken anv dioutañ. A-vec'h ma vefe kavet meneg anezhañ en ur Geriadur Bras al Livouriezh ; hag en e vro c'henidik zoken eo bet disoñjet a-grenn. E levrioù kozh kêr e komzer eus e « Lazar o sevel eus ar bez » hogen evit un nebeut gwenneien eo bet gwerzhet an daolenn pa 'z eo bet diskaret an iliz. Ha den n'oufe lavarout mui pelec'h emañ bremañ...

... AQUIS SUBMERSUS

**Moulet  
evtt  
A1 Liamm Tir na n-og  
e Ti Ar Skrev  
Ar Baol  
1950**



